



# Kan ar Dobloù

*Le chant des Peuples*

Dindan gwarez  
santez Anna

Sous la protection  
de sainte Anne



# KRENNVA



## Sommaire

### Testenn vrezhonek

- *Tiegezh Santez Anna* ..... p. 3
- Feiz ha sevenadur (un nebeud pennadoù  
eus Magistrerezh an Iliz)..... p. 7
- Dindan gwarez Santez Anna - Arroudoù  
eus ar *Garta a Garitez* ..... p. 9
- Dezvadoù *Tiegezh Santez Anna* ..... p. 27
- Dezvadoù ar *Gileed* ..... p. 35
- Bevañ dindan bennozh Doue e Breizh ..... p. 47
- Roll ar gerioù dibaot ..... p. 50

### Texte français

- *La Famille Sainte Anne* ..... p. 53
- Foi et culture (quelques textes du Magistère de l'Eglise) ..... p. 57
- Sous la protection de Sainte Anne - Extraits de  
la *Charte de Charité* ..... p. 59
- Statuts de la *Famille Sainte Anne* ..... p. 77
- Statuts des *Compagnons* ..... p. 85
- Vivre sous la bénédiction de Dieu en Bretagne ..... p. 97

Pedenn evit Breizh / Prière pour la Bretagne.....p. 100

## Tiegezh Santez Anna

### Un tiegezh speredel

**"Trugareziou an Aotrou a fell din kanañ da viken,  
a rummad da rummad, me venn embann ho fealded gant va muzelloù. " (S 88,1)**

Trugaregezh a sav leun hor c'halonoù o kounaat oberoù burzhudus an Aotrou e-sell d'hor silvidigezh.

Evel ma ouzomp evit gwir, en deus Doue dibabet ur bobl, Israël, evit distreiñ outañ holl an denelezh dianket gant ar pec'hed. Gant ar bobl-se en deus Doue skoulmet un Emglev a-benn he diougonañ hag he lakaat da vevañ en E ouezvoud.

Er bobl hebreek eo en deus Verb Doue kemeret korf eus ar Werc'hez Vari hag en deus en em c'hraet den evit silvidigezh an holl dud. Jezuz Krist, Mab unganet Doue, gwir Doue ha gwir den, en deus diskuliet dremm karantezus Tad an holl dud. Dre e varv ouzh ar Groaz ha dre e Zasorc'h en deus siellet da viken an Emglev Nevez hag en deus hon tennet eus ar pec'hed hag eus ar marv. Kement den a gred ennañ a dremen evel-henn eus ar marv d'ar vuhez.

Dre c'hwezhadenn ar Spered Santel war an Iliz kentañ, da zeiz ar Pantekost, en deus deraouet Doue e Rouantelezh e-touez ar broadoù hag en deus erzerc'het, gant *burzhud ar yezhoù*, e oa galvet an holl bobloù en o dibarelezh, gant o yezh hag o sevenadur dezho o-unan, da zegemer buhez nevez ar Spered.

E kreiz he istor dezhi he-unan eo e vez galvet pep pobl da zegemer ar silvidigezh ha da vont tre, gant he sevenadur piaouel, e *lid meur an Emglev* o tegas holl binvidigezhioù he denelezh da diegezh meur bugale Doue en doare da glodekaat an Aotrou Jezuz, e nerzh ar Spered Santel, evit klod an Tad.

Evit degemer steuñv marzhus karantez Doue war an denelezh en em fiz didro ar gristenion er Werc'hez Vari m'en em astenn he damant a vamm ouzh an Iliz en he fezh hag ouzh an holl dud abaoe m'en deus ar C'hrist ouzh ar Groaz he roet dimp da Vamm. Bez edo e-touez an Ebestel da-geñver ar Pantekost hag e erbed dizehan evit ma tegemerfe an Iliz c'hwezh bevaus ar Spered Santel.

Mari, pried peurvat an Aotrou ha skeudenn diouganel an Iliz, a ro skoazell da bobl Doue a zle diverzout galvadennoù ar Spered en ur bed merket c'hoazh gant ar pec'hed hag e heuliadurioù, ha ma rank ar gristenion kerzhout ennañ evel pirc'hirined davet an neñv, kanttreiñ bepred muioc'h-mui ouzh buhez ar Spered Santel ha testeniañ eus ar C'hrist bev en o buhez.

Hag hi Merc'h Sion, bleuniet war wezenn Yese ez eo ar Werc'hez Vari frouezhenn hollgaer hir ha trevellus desaverezh douel Israël. Hervez an Hengoun ez eo Mari merc'h Anna ha Yoakim, anezho ur c'houblad eus *restad santel Israël* bet chomet feal d'an Aotrou daoust da holl drubuilhoù ha da oberoù disfeal ar Bobl Dibabet. Santez Anna, diwar emelladenn Doue, a c'hanas Mari, bet miret diouzh ar pec'hed e-sell da vezañ mamm Mesiaz Israël, Salver an dud. Hag hi merc'h Israël ha Mamm an holl dud ez erbed Mari evit pep pobl galvet da gemer perzh e tiegezh meur Doue o tegas dezhañ he finvidigezhioù dezhi he-unan.

War zouar Breizh eo, lec'h ma resev ar gristenion, dre hengoun, Mari *a-dre daouarn santez Anna*, ez eo ganet hon tiegezh speredel: *Tiegezh Santez Anna*.

E kreiz an Iliz ez eo galvet an izili anezhañ da vuheziñ kevrin an Enkorfidigezh hag ar vuhez nevez er Spered Santel, o vezañ evezhiek pergen da reiñ korf d'o feiz en o sevenadur dezho o-unan. Lidañ a reont enta Emglev ar Silvidigezh o tispakañ o buhez kristen en atil sevenadurel o fobl hag o herouezañ holl eztaoladoù enstuzegezh ar feiz a-benn sevel ur vuhez gwriziennet a-grenn er C'hrist (kv *Kol 2,7*).

***"Dellezek oc'h da resev al Levr ha da derriñ e sielloù, dre ma'z oc'h bet lazhet ha m'hoc'h eus dasprenet ha gonezet da Zoue gant ho kwad, tud eus pep meuriad ha pep yezh, ha pep pobl ha pep broad, dre m'hoc'h graet anezho d'hon Doue ur rouantelezh a veleion da vezañ rouaned war an douar."*** (Disk 5,9)



## Unanet holl en discurtelczh

Dastummet gant Doue hervez galvidigezhioù disheñvel e c'hell izili *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* bevañ diouzh gras hon tiegezh speredel o vezañ:

- *enkoulmet er Genunaniezh*
- *emouestlet en ur vreuriezh-annezel*
- *kileed.*

*Enkoulmañ e Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a dalv bezañ mennet da vuheziñ en e vuhez pemdeziek ar c'halvadenn varzhus da zispakañ e feiz kristen en e sevenadur dezhañ e-unan, unanet ouzh hon tiegezh speredel, dindan baeroniezh santez Anna.

Diazezet e vo an enkoulmidigezh e *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* war un nebeud teulioù anvet:

- *Karta a Garitez Tiegezh Santez Anna* anezhi un destenn o reiñ da anaout galvadenn gevredin *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a-ziwar Komz Doue;

- *Dezvadoù Tiegezh Santez Anna* anezho un teul o reiñ da anaout petra eo *Tiegezh Santez Anna* ha penaos ez eo aozet e-keñver an Iliz;

- *Levr Emglev Tiegezh Santez Anna* anezhañ ur skrid speredel diazezet war gelennadurezh an Iliz o skoazellañ da vuheziñ an Emglev hervez galvadenn *Tiegezh Santez Anna*.

- *Levr burzhudoù Doue e Breizh* o tezrevellañ lid sevenadurel an *Emglev* e Breizh hervez enstuzegezh ar feiz en hor bro (ha diwezhatoc'h, mar fell da Zoue, e broioù all lec'h ma vo diazezet *Tiegezh Santez Anna* !)

*Emouestlañ en ur vreuriezh-annezel* eus *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a dalv bezañ galvet d'ur vuhez kumuniezhel gant breudeur ha c'hoarezed, dezho marteze stadoù-buhez liesseurt, bodet er bedenn hag el lodennañ breurel, en ur vreuriezh gwriziennet en ur sevenadur goubarzhel evit mont tre e lid hollvedel an Emglev.

Diazezet e vo an *emouestladenn* en ur *vreuriezh-annezel* war deulioù anvet:

- *Dezvadoù breuriezhoù-annezel Tiegezh Santez Anna* o reiñ da anaout hennad hag aozadur ar *breuriezhoù-annezel* e keñver an Iliz

- *Levr Buhez breuriezhoù-annezel Tiegezh Santez Anna* o reiñ da anaout reolenn ha kustumoù ar *breuriezhoù-annezel*.

**Dont da vezañ kile** e *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a c'hoarvez e vuheziñ ur wir *engouestladenn* gristen gant arvezioù kumuniezhel e darempred


gant ur *vreuriezh-annezel*, en un doare gwevn hag azasaet ouzh pep hini, hervez un *emgleviad* hiniennel o talvezout evit ur bloavezh ha savet gant ar *c'hile* diouzh krefen boutin d'an holl, hervez un argresk a vloaz da vloaz.

Diazezet e vo *engouestladenn* ar *gileed* war un teul anvet ***Dezvadoù Kileed Tiegezh Santez Anna*** ha war an *emgleviad hiniennel* savet gant pep *kile*.

Bodet evel-henn gant ar C'hrist e kenunaniezh ar Spered Santel ez eo galvet *Tiegezh Santez Anna* da ganañ meuleudioù Doue gant holl binvidigezhioù sevenadur kement pobl ma vo gwriennet enni evit brasañ klod an Tad.

***"Deoc'h, o Doue, meuleudi ar pobloù,  
deoc'h-c'hwi, meuleudi an holl bobloù !"***

(S 66,4)



## Feiz ha sevenadur

"Hogen arabat ankounac'haat e oa liammet feiz ha buhez ar bobl, er brioù kristen pe bet kristen, en doare damheñvel ouzh unvez an ene hag ar c'horf. Lec'h ma'z eo kollet hiziv an unvez-se, lec'h ma'z eo aet ar feiz da glouaraat, daoust hag e talc'ho hag e nevez an hengounioù pobl, zoken diwar duniou, ur wech troc'het diouzh o andonioù." (Pius XII, Eost 1943.)

"Pleustrerezh liesseurt ar santelezh. E par doareoù-buhez liesseurt ha trevelloù disheñvel, e vez unseurt ar santelezh a zamant dezhi nep piv bennak a vez lusket gant Spered Doue: dre sentiñ ouzh mouezh an Tad, war-bouez azeuliñ an Tad dre ar spered hag ar wirionez, sed ez a da heul ar C'hrist o tougen e groaz, paour hag uvel, dezhañ da zellezout perzhiañ en e glod. Hervez e varregezh, e tle neuze pep den, hep morse termal, kemer engouestl war hent ar feiz virvidik a zihun ar goubeizh hag oberiañ diwar-bouez ar garitez." (Sened Meur Vatikan II, Lumen Gentium nv 41.)

"An troc'h etre Aviel ha sevenadur zo, hep mar ebet, unan eus gwallreuziadoù hor grez." (Paol VI Evangelii Nuntiandi nv 20.)

"Al liked, emañ dezho dizoleiñ ha seveniñ ar c'halvedigezh hag ar gefridi o deus e piaou, oc'h emplegañ evito ar retvez da gaout ur stummadur war ar vuhez en unded ma tougont ar merk anezhi betek en o boud evel izili d'an Iliz ha keodedourion d'ar gevredigezh denel. En o hoali, ned int ket evit kaout div vuhez kenstur: diouzh un tu ar vuhez a vez graet "speredel" anezhi gant he zalvoudoù hag he darvennadoù, ha, diouzh an tu all, ar vuhez anvet "bedel", eleze buhez an tiegezh, al labour, ar gedvuhez, an engouestloù politikel, an amrealioù stuzegezhel. Ar skourrig imboudet war ar winienn a zo ar C'hrist, a vez o teurel e frouezh war gement tachenn a denn d'an ober ha d'ar vuhez. D'ar vuhez unvan-mañ eo en deus Goursened Vatikan II pedet holl feizidi al likelezh, war-bouez tamall gant nerzh grevusted an torr a c'hoarvez etre feiz ha buhez, etre Aviel ha stuzegezh." (Yann-Baol II Christi-fideles laici; nv 59.)

"Goursened Vatikan II, bet mennet gant Yann XXIII, zo bet an hini kentañ o ouestlañ e gelennadurezh d'ar sevenadur. Henn ober a ra dre maz eo diarvar dezhañ e taolo sklêrijenn war gevrin an den, hag en e skoazello da dizhout razh e c'halvedigezh, dre seveniñ kefridi an Iliz a zo an Avielerezh. Pa gomz diwar-benn sevenadur e vez ar Goursened o troadañ e Hengoun meur an

abostolerezh renet gant an Iliz, hag o sammañ un hêrezh hag e vremanaat." (Kal. Poupard, prezegenn da geñver Kendalc'h Kedilizel Bern.1992.)

"Lakait evezh, par ma c'hellit, war an emveli diazez a zo da bep broad dre berzh he sevenadur dezhi hec'h-unan. Gwarezit-hi evel mab ho lagad evit dazoned tiegezh an holl dud. Gwarezit-hi ! Arabat deoc'h gouzañv ma teufe seurt emveli diazez da vezañ preizh nep galloud politikel bennak pe armerzhel bennak." (Yann-Baol II dirak an Unesco 2/6/1980.)

"Kemennidigezh an Aviel d'ar sevenadurioù diseurt, tra ma c'houlenn digant e gemennadourion entuañ dre ar feiz, ne harz ket outo da virout un hennadelezh sevenadurel dezho o-unan. Disrann ebet ne sav diwar-se o vezañ ma oar pobl hollvedel an dud badezet degemer en un doare heverk nep sevenadur o herouezañ e pep hini anezho ar pezh a zoug en un doare empleg da zisplegidigezh leun ar wirionez." (Yann-Baol II, Fides et Ratio, nv 71.)

"Ar feiz, ur wech deuet da vezañ sevenadur, a laka ur sevenadur kristen da ziwanañ. N'eus nemet ur sevenadur kristen a gement a ve gouest da ginnig dimp, n'eo ket hepken un *doueoniezh denoniezhel* soliet war ziskuliadur ar C'hrist peurheñvel ouzh Doue, nemet ivez un *denoniezh doueoniezhel* maz adkaver ganti an Den-Doue hag Eñ henbatrom pep denelezh wirion. Kement sevenadur na rofe ket e lec'h reizh d'an den heñvel ouzh Doue, a vefe engwallet ouzh hollveliegezh tidedek. Ar glad speredel kristen ez eus anezhañ eztaoladur fetis ur sevenadur intret gant an Aviel, anezhañ un dedaoler talvoudoù gwirion. Un teñzor-tiegezh ez eo dimp an hêrezh-hont, petra bennak maz eo ivez glad an denelezh kevan. Kudenn ar c'hristen hiziv zo dont *d'emouezañ adarre ouzh pezh a zo anezhañ* hag ouzh e heñvelded andoniel ouzh Doue, eleze dont d'emskiantañ talvoudegezh teñzor an Aviel, hag eñ nemetañ barrek da vastañ d'e c'houlennoù, d'e sklerijennañ pa chom en entremar, ha da vannañ goulou ar feiz e kalon ar sevenadurioù. Un amkan da dizhout eo treuzkas hevelep hêrezh."

(Kal. Poupard. Prezegenn Porto. 07.02.1991)

## Dindan gwarez Santez Anna Arroudoù eus ar *Garta a Garitez*

"*Doue zo karantez, eme sant Yann, hag an hini a chom er garantez a chom en Doue, ha Doue a chom ennañ.*" (1 Yn 4,16) Dre ma'z eo ergorenn karantez arbennik e Grouer ez eo galvet pep den gant an Tad, e Jezuz Krist, dindan c'hwezh ar Spered Santel, da zigeriñ e galon evit bezañ peurleuniet bepred gant karantez Doue ha neuze adsavet, treuzneuziet betek an unaniezh peurbadel e klod an neñv.

Ar garantez eo a laka ar vuhez da adsevel e kalon mab-den gloazet. Ar garantez eo a c'hell kenilañ ar c'han dibar a veuleudi e kalon pep den, e kalon pep pobl. Ur seurt kan a garantez ez eo galvet izili *Tiegezh Santez Anna* da vont gantañ o kellidañ, o kreskiñ, o vleuniañ hag o tougen frouezh a santelezh (kv Kol 1,9-11) en douar m'int bet hadet ennañ gant Doue.

### **Pep den war an douar zo galvet gant Doue**

Krouet diouzh skeudenn ha heñvelded Doue (kv Gn 1,26) ez eo galvet mab-den, evel m'en diskouez dimp ar Skritur Santel, da vevañ e gouezvoud e Grouer hag emañ galvadenn karantezus hon Doue o tasseniñ a-hed istor mab-den, abaoe troc'h ar pec'hed kentañ: "*Adam pelec'h emaut ?*" (Gn 3,9) Goude bezañ skoulmet un Emglev gant Abraham ha lakaet dre vuzhud da sevel ur bobl dioutañ - ar *Bobl Dilennet* - e sell da lakaat holl bobloù an douar da zistreiñ davetañ (kv Gn 12,3) en deus Doue "*pa'z eo deuet leunder an amzer, kaset e Vab, ganet eus ur vaouez.*" (Gal 4,4.) *Leunder an amzer* a dalv evit kevrin an Endenadur ha kevrin an Daspren: er Mab unsolwez gant an Tad ha deuet da vezañ den e korf ar Werc'hez Vari, e tegouezh hag e vez peursevenet an *amzer* gortozet, amzer ar c'hras hag an drugarez, amzer ar silvidigezh hag an adunaniñ bet kemennet gant an Diouganerion. Diskuliañ a ra ar C'hrist steuñv an Aotrou Doue e-keñver ar grouadelezh ha pergen e-keñver mab-den. Erzerc'hañ a ra a-grenn an den outañ e-unan hag e tiskoach dezhañ meurdez e c'halvidigezh kuzhet e kalon Doue. Hogen kevrin ar Verb endenet ne vo dioueliet da vat nemet pa vo kefleuniet ennañ-Eñ kement den a zo hag eñ o tont da vezañ mab er Mab, ezel eus E Gorf Kevrinel a zo an Iliz (kv Kol 1,24).

Rak Doue hag "*a fell dezhañ e vefe salvet an holl dud hag e teufent da anaout ar wirionez*" (1 Tm 2,4) zo deuet da zigeriñ e Jezuz Krist hent ar silvidigezh d'an holl: "*Me eo an hent, ar wirionez hag ar vuhez, eme Jezuz.*"

*Den ebet ne zeu d'an Tad nemet drezon.*" (Yn 14,6) Dre ar C'hrist savet en dismegañs ouzh ar Groaz dre garantez evidomp, ha savet klodus d'an neñv lec'h ma'z omp galvet da vezañ ivez gantañ, e c'hoarvez hiviziken un dedennañ hollvedel davet Doue (kv Yn 6, 44) dindan lusk ar Spered (kv Yn 14,20) evel m'en doa lavaret Jezuz E-unan: "*Ha me, pa vin bet uhelsavet diouzh an douar, eo an holl dud a dennin davedon.*" (Yn 12,32) Hiviziken, dre berzh an Emglev siellet gant gwad Jezuz ez eo galvet pep den war an douar da dremen eus ar marv d'ar vuhez (kv Rm 6, 4) ha da bleustriñ er Spered Santel buhez mibion Doue (kv Gal 4, 4-6). "*Evel m'emaout Tad ennon ha me ennout, eme Jezuz en e bedenn a-raok e Basion, ra vezint int ivez ennomp evit ma kredo ar bed ac'h eus va c'haset (...)* hag ac'h eus o c'haret evel m'ac'h eus va c'haret." (Yn 17,21,23)

### **Pep pobl war an douar a zo galvet gant Doue**

Hor gervel a ra Doue davetañ gant holl ar pezh ez omp hag e teu zoken ar c'hras da dreuneuziañ heuliadoù ar pec'hed en hor buhez (kv Rm 5-6). Ma kinnig ar Bibl disparti ar broadoù ha rouestlidigezh ar yezhoù goude an *Liñvadenn Veur* evel un dra mennet gant Doue (kv Gn 10) ez eo koulskoude un heuliad eus pec'hed Adam hag Eva a fellas dezho dont da vezañ "*evel doueed*" (Gn 3,5) hag eus pec'hed o diskennidi a vennas sevel "*un tour, e benn en neñvoù.*" (Gn 11,4) Hogen dre c'hervel an holl bobloù gant o dibarelezh eo e fell da Zoue bodañ ur bobl nevez hag adunaniñ an denelezh gantañ.

Istor an Emglev a grogas gant un den, Abraham hag e diegezh a voe galvet gant Doue e-kreiz darvoudoù e vuhez hiniennel ha ma teuas dioutañ ar bobl a voe bleniet gant Doue a-dreuz kammdroennoù he hanez. E-kreiz danvez fetis e vuhez, e-kreiz istor e bobl ez eo galvet ivez pep den da zegemer steuñv a silvidigezh Doue war an denelezh. Pep pobl, evit gwir, zo galvet gant Doue (kv S 116) da vont tre e kevrin an Emglev hag emañ grataenn Doue da Abraham o tasseniñ evit an holl bobloù: "*Benniget e vo drezout holl gerentiezhoù an douar.*" (Gn 12,3)

Gant Jezuz e voe kadarnaet dibab Israël ha war un dro steuñv hollvedel ar silvidigezh evit ar broadoù a grogas da vezañ sevenet gant kasadenn ar Spered Santel a ra d'an Iliz dougen testeni eus karantez Doue dre an douar a-bezh (kv Ob 1,8), d'an holl bobloù gant o sevenadurioù ha yezhoù liesseurt (kv Ob 2,4) Rak ar bobl nevez, ar "*vroad santel*" (1P 2,9) a fell da Zoue dastum an holl dud enni dre berzh ar silvidigezh gounezet dimp gant ar C'hrist Jezuz n'eo ket unan unneuz an hini eo met unan liesliv stummet gant ar Spered Santel diouzh diseurtelezh an denelezh ha liesseurtiezh ar bobloù ha sevenadurioù: "*tud eus pep meuriad ha pep yezh, ha pep pobl ha pep broad.*" (Disk 5,9-10). Hiviziken e c'hell an holl dud, an holl vroadoù, dre o feiz e Jezuz, emvataat eus grataenn

Doue da Abraham: "Komprenit mat ez eo an dud a feiz ar re a zo mibion Abraham, eme sant Paol d'ar C'halated. Hag ar Skritur o rakwelout eo dre ar feiz e rofe Doue ar reizhder d'ar Broadoù, a rakkemennas ar c'helou mat-se da Abraham: 'Ennout, emezi, e vo benniget an holl vroadoù' en doare ma vez benniget an dud a feiz a-gevret gant Abraham an den a feiz." (Gal 3, 7-9)

### Galvet da vezañ izili eus Tiegzh Jezuz

Evel *Pastor Israël* (kv Gn 49,24;S 80,2) o tastum e zeñved hag ouzh o c'has d'ar peurvanoù mat e lakaas Doue da sevel bugulion diouzh E Galon (kv S 76,21) evit bleniañ ar Bobl Dibabet war hentoù asur. Hogen evel m'en doa kemennet dre E ziouganer Yezekel (kv Yz 34,12.15) ez eo deuet Eñ e-unan, dre Jezuz, da zastum an deñved lezet hep pastor. Ha ni dedennet gant an Tad da vont war-lerc'h Jezuz ar *Pastor Mat* (Yn 10, 14...), o c'hortoz bezañ unanet outañ da vat en neñvoù, gant holl vugale Doue, galvet omp, a-hed hor buhez war an douar, da vezañ ambrougerion Jezuz, kenveajourion Jezuz, *mignoned* Jezuz (kv Yn 15,15), kenvreuriezh Jezuz, Iliz Jezuz. Evel-se emañ Doue o sevel un tiegzh nevez, *Tiegzh Jezuz*: "Setu va mamm ha va breudeur, emezañ: an neb a ra bolontez Doue, hennezh a zo breur din ha c'hoar ha mamm." (Mk 3,14)

Bodadenn Pobl Doue dastumet gant ar Christ eo an Iliz, he anv *ekklesia* o talvezout *kengalv* e gresianeg. Enni emañ strollet dre berzh ar Spered Santel an holl dud o deus klevet galvadenn an Tad er C'hrist Jezuz: annezidi an neñv zo endeo e gloar Doue, Pobl Doue en hent war an douar hag ar re dremenet o c'houzañv ar c'hlanidigezh diwezhañ. Hiviziken ez eo galvet gant an Tad ha dre berzh an Iliz, kement den, eus kement pobl a zo war an douar, da zistreiñ davetañ ha da vezañ salvet dre ar feiz e Jezuz Krist ha dre welc'hadenn ar Spered Santel (kv 2Tes. 2,13).

### Tiegzh Santel Nazared, gwrizienn an tiegzhioù kristen

Doue a fell dezhañ hol lakaat da gemer perzh en e vuhez treindedel oc'h ober ac'hanomp evel izili e diegzh. Dre an *tiegzh* e tremen, evit gwir, steuñv a silvidigezh an Aotrou Doue war an denelezh. Gant ur c'houblad, Abraham ha Sara, eo e tibabas Doue skoulmañ an Emglev hag e c'hrataas dezho, daoust ma oant deuet endeo war an oad ha chomet divugel betek-henn, e teufe anezho diskennidi ken niverus hag ar stered en oabl (kv Gn 15,5-6). Dre an tiegzh-se ma zeuas anezhañ ur bobl eo en deus Doue mennet lakaat an holl bobloù da zistreiñ davetañ ha stummañ un tiegzh nevez gant an denelezh, unvan ha liesseurt war un dro.

Hag evel ma c'hoarvezas gant Abraham ha Sara e welomp, a-hed Istor Santel Pobl Doue, en deus an Aotrou roet gras an engehentañ da goubladoù gaonac'h, o tiskouez evel-henn E hollc'halloudegezh kendruezus hag o tibab tud evit kas war-raok an Emglev. E gouloù-deiz istor hor silvidigezh e Jezuz Krist, e kaver ivez, hervez an hengoun, daou bried santel eus Jeruzalem, chomet divugel, Anna ha Yoakim, a bede an Aotrou o c'hortoz ar Mesiaz grataet d'o fobl gant Doue. Frouezh ar briedelezh-se, bet skoet gant an amprouenn, a voe benniget gant Doue a reas enni burzhud Engehenterezh Dinamm Mari, Mamm Jezuz. E Mari, bet miret diouzh ar pec'hed e sell d'he roll dibar en istor ar silvidigezh, eo en deus Doue mennet dont da vezañ den. Ha Doue, en deus dibabet c'hoazh un tiegezh, hini Mari ha Jozef, a-benn skoulmañ an Emglev Nevez ha peurbadel e Jezuz Krist.

Tiegezh Nazared a gaver ennañ evel berrzastumet an denoniezh viblek en he fezh o tiskuliañ erbar karantezus ar C'hrouer war an den, par ha parez, krouet diouzh skeudenn Doue. Eno e krogas Doue da adsevel an denelezh dre an Adam Nevez, Jezuz (kv 1Ko 15, 46-49), ganet eus an Eva Nevez ar Werc'hez Vari, ha gant emginnigadenn sant Jozef roet holl, eñ ivez, da sevenidigezh erbar Doue. Gant Mari ha Jozef, en deus bevet Jezuz, Mab Doue deuet da vout den, ur vuhez tiegezhel ma sank enni e wrizioù *Tiegezh Meur Jezuz* a zo an Iliz.

### **Tiegezh an Iliz, lec'h ar repu hag ar silvidigezh**

Emañ an tiegezh, anat dimp, e kreiz istor Israël. Anezhañ, gouel meur o fobl en eñvor da zarvoud dieubidigezh an Hebreed eus Bro-Egipt, gant Moshe en o fenn, ez eo ivez Pask ar Yuzevion ur gouel tiegezhel. E-kerzh an noz ma tremenas Ael an Aotrou (kv Erm, 12, 1-14) ez anavezer an ti - annez an tiegezh - evel lec'h ar repu hag ar silvidigezh. Anadiñ a ra an *ti* hag an *tiegezh* ramparzh ar vuhez lec'h ma kaver surentez ha peoc'h ar vuhez a-gevret dindan sell an Aotrou. Hag evel m'en deus en em ziskouezet Doue evel dieuber ha Salver e bobl ez eo galvet pep den da arnodiñ ar silvidigezh en e vuhez hiniennel eleze da vuheziñ e Bask gant an Aotrou.

Hiviziken ez eo an Iliz, anezhi *tiegezh meur Jezuz*, an *ti* nevez, lec'h ar repu hag ar silvidigezh, kerrin ar silvidigezh evit ar bed hag e fell da Zoue dastum enni, evel dre un Arc'h Noah nevez, holl an dud, holl an diegezhioù hag holl bobloù an douar evit o c'has d'e Rouantelezh a garantez. En Iliz eo e c'hell pep den en em zispakañ oc'h en em anavezout, dindan c'hwezh ar Spered Santel hag e Jezuz Krist, evel ur mab eus an Tad er c'har en e zibarelezh.

## Ur mor a diegezhioù liesseurt lakaet da sevel dre ar Spered Santel

Da heul ar Salver e kerzh an Iliz dre an douar a-bezh ha betek dibenn an amzer o tastum enni ar re salvet, oc'h embann ar silvidigezh, o labourat da sevel ur bed treuzneuziet gant karantez Doue, o kenilañ meuleudi Doue e kalon pep den, e kalon pep pobl. Hag evel ma c'helle ar birc'hirined war hent Jeruzalem da geñver gouel Pask en em vodañ a strolladoù a-ziforc'h (kv Lk 2, 41-45) anezho en nozvezh-se *ti* ha *tiegezh* ar Pask e c'hell ivez ar gristenion, e tiegezh bras mignoned Jezuz, hag int ouzh E heul war hent an Aviel dre ar bed hag a-hed an istor, en em strolañ, lusket gant ar Spered Santel, a diegezhioù liesseurt, o vevañ ar Pask gant Jezuz an Oan. Evel-se emañ bepred ar Spered Santel o labourat e kalon ar feizidi en doare da sevel Iliz Doue war an douar hervez diseurtelezh an denelezh ha galvadennoù Doue (kv I Ko 12, 12-21).

Oc'h en em wriziennañ en e diegezh eo e c'hell mab-den en em anavezout den en e c'hourevezh pe e venevezh ha dispakañ e dended. Oc'h en em wriziennañ en ur bobl gant he sevenadur dezhi he-unan e c'hell mab den en em anavezout ezel eus tiegezh meur an denelezh ha lakaat da vleuniañ e zibarelezh. Oc'h en em wriziennañ en un tiegezh speredel e c'hell ar c'hristen kemer e lec'h ivez e Pobl Doue a zo an Iliz ha dougen frouezh evit ar Rouantelezh.

### *Tiegezh Santez Anna, hon tiegezh war hent ar Pask*

Evit digeriñ gwelloc'h hor buhez d' e garantez divent, en deus an Aotrou Doue graet dimp keveliñ gant un *tiegezh speredel* ma voe roet dezhañ un *anv nevez* (kv Disk 2,17) - *Tiegezh Santez Anna* - a-berzh "*an Tad emañ pep tiegezh o tennañ he anv dioutañ en neñvoù ha war an douar*" (Ef 3,14) E danvez buhez kement hini ac'hanomp en deus labouret ar Spered Santel ha bleniet en deus hor c'hammedoù evit hon bodañ dindan gwarez Mamm Mari, war an hent sklêrijennet hor c'has dre Jezuz davet ti an Tad a-dreuz levenezioù ha poanioù ar vuhez-mañ, "*an hent nevez ha bev en deus digoret dimp a-dreuz ar ouel*." (Hb 10, 20).

Daoust ma hañval bezañ gougelek lec'h santez Anna en erbaroù Doue o vezañ ma n'eus ket anv anezhi er Skritur Santel e vez kehelet koulskoude Mamm Mari gant an Iliz abaoe ar c'hantvedoù kentañ. He resevet hon eus da baeronez hon tiegezh speredel e Breizh lec'h ma vez enoret adalek orinoù ar feiz kristen eno, war an douar-se lec'h m'en em ziskouezas er XVIIvet kantved da Iwan Nikolazig. Hogen ar Spered Santel n'en deus ket dec'hanet *Tiegezh Santez Anna* gant ar pal arbennik da reiñ da anaout e baeronez santel na da vrudañ ar buzhudoù diraezet dre he hanterouriezh. Kouviet omp kentoc'h da vont gant he *sioulded* evit arvestiñ ganti ouzh kevrinoù Doue ha da c'houlen

he sikour evit dispakañ hor buhez e gouloù Doue war an douar ma'z omp galvet da vevañ ennañ.

Rak derc'hel a ra santez Anna, gant an elevez a vennas an Aotrou Doue he gwiskañ ganti, ul lec'h a-bouez hag azonus kenañ, evit gwir, en engwezhiañ kevrin an Enkorfidigezh. Gant santez Anna, merc'h ar bobl bet dibabet gant Doue e sel en em reiñ da anaout d'an dud, ha mamm ar vaouez bet dibabet a-douez an holl wragez evit bezañ Mamm ar Verb Enkorfet, e vezomp splujet en arvesterezh ouzh oberoù moliac'hus Doue a-benn silvidigezh an denion. *Evel pa rankfe kilañ komzoù mab-den dirak an Enkorfidigezh o tostaat, eo bet pourc'het ar Gomz a sioulded evit en em reiñ da glevout pa zeuas ar Verb da vout den.* Skeudennaouet eo ar c'hevrin-mañ gant testeni souezhus Zakaria, lakaet da vezañ mut (kv Lk 1,22) tra m'edo o vont da engehentañ Yann Vadezour an hini a zezanvo Jezuz evel *Oan Doue* (kv Yn 1,36). Dre ur *sioulded* don, marzhus ha dreistkenedek e chom kuzhet Anna evel a-dreñv da Vari. Marzh kaerañ istor mab-den, eleze Enkorfidigezh ar Verb peurbadel bet kemennet gant ar Brofeded, zo bet ragaozet en un dirgel bras ma'z eo santez Anna evel ar siell anezhañ. Diskouezet kaer e vez kement-mañ war-bouez henskeudennoù o tiskouez santez Anna pedourez splujet en arvesterezh ouzh kevrinoù Doue pe c'hoazh gant ul livadur kozh kenañ eus Bro-Nubia ouzh he diskouez gant he biz war he muzelloù, evel ouzh hon pediñ da devel rak ar *Burzhud*, he daoulagad dispourbellet rak kened marzhoù Doue. Bez ez eo santez Anna, hag hi merc'h Israël ha mamm Mari "*an hini m'eo bet ganet anezhi Jezuz a anver Krist*" (Mz 1,16), evel ur pont lugernus, mouchet gant ur goabrenn, etre Istor Santel ar Bobl Dibabet hag istor pep den, pep tiegezh, pep pobl galvet holl da zegemer ar Salver.

### **Holl deñzorioù an neñv etre daouarn santez Anna: ar Bibl**

O tigeriñ evel-henn hor c'halonoù ouzh kevrin santez Anna e kav dimp he c'hlevout o lavarout dimp, evel gwechall da Iwan Nikolazig: "*Emañ holl deñzorioù an neñv etre va daouarn.*" Hervez ar skeudennidigezh hengounel o tiskouez santez Anna o *kelenn* he merc'h Mari, ez eo ar Bibl a weler alies etre daouarn mamm ar Werc'hez. Rak danevellañ a ra dimp an hengoun he deus santez Anna enhentet he merc'h da zaremprediñ ar Skritur Santel ha gant he biz o redek war al lizherennoù santel e teskas da Vari mont gant hentoù an Aotrou Doue. Santez Anna gwisket holl a sioulded hon doug, ni ivez, da devel ha da reiñ skouarn da vouezh an Aotrou o komz ouzhimp eus an neñv (kv Hb 12,25). Hag hi merc'h ar bobl bet stummet gant Komz Doue ha mamm Mamm Jezuz, ar Gomz deuet da vout den, santez Anna zo evidomp, evit gwir, evel ur meleour eus ar Skritur Santel, evel ul letrín d'ar Gomz en em ro dimp. Hag hi

penhêrez grataennoù Israël, e c'hell santez Anna hon skoazellañ da arselliañ, en un doare spisoc'h c'hoazh, an hir a hent en deus ranket Doue toullañ evit tizhout kalon mab den. Bez e c'hell hon skoazellañ da zizoleiñ diougonerezh Doue war Israël ha steuñv a silvidigezh an Aotrou war holl bobloù an douar galvet d'ar silvidigezh er C'hrist Jezuz.

O heuliañ biz santez Anna o ruilhal war ar Skritur Santel e vezomp lakaet d'ober eñvor eus darvoudoù diazez an hollved hag eus istor an Diskuliadur o tizoleiñ an hir a aozidigezh da gevrin an Enkorfidigezh. Lakaet e vezomp d'ober eñvor eus krouidigezh an hollved, eus krouidigezh an den - par ha parez - diouzh skeudenn Doue, eus ar pec'hed kentañ hag eus grataenn ar silvidigezh. Lakaet d'ober eñvor eus hevreinidigezh an denelezh, eus al Liñvadenn-veur hag eus Arc'h Noah. Lakaet d'ober eñvor eus savidigezh Tour Bavel hag eus dasparzhidigezh ar yezhoù. Lakaet d'ober eñvor eus an Emglev gant Abraham a voe galvet gant Doue da guitaat e vro evit mont davet an *Douar Grataet*. Lakaet d'ober eñvor eus Moshe bet lakaet gant Doue e penn e bobl evit he lakaat da guitaat Bro-Egipt, douar a sklavelezh. Lakaet d'ober eñvor eus ar Pask, eus treizhadenn ar Mor Ruz, eus amprouadenn ar chomadenn er gouelec'h, eus Arc'h an Emglev. Lakaet d'ober eñvor eus David roue klodus Israël hag eus savidigezh an Templ. Lakaet d'ober eñvor eus ar Brofeded o deus kemennet donedigezh ar Salver hag e c'hanedigezh eus ur verc'h ag Israël.

E razh an darvoudoù-se e weler an Aotrou Doue o voulc'hañ un hent e kildroennoù kalon mab-den. Gwelout a reomp an Aotrou Doue o tiskuliañ e garantez d'e Bobl Dibabet, e-kreiz pobloù pagan hag int roet d'an idolouriezh ha d'ar varbarelezh. Gwelout a reomp Doue oc'h en em ziskuliañ dreist d'ar pezh a c'helle meizadañ mab den: "*Rak va mennozhioù ned int ket ho mennozhioù, nag ho hentoù va hentoù, diougan an Aotrou.*" (Ye 55,8) O sellout evel-henn santez Anna - melezour ar Skritur Santel - a c'hanas Mamm ar Salver bet prientet e zonedigezh e-doug kantvedoù oberiant, e tarzhe an drugarekadenn hag ar veuleudi en hor c'halonoù evit kanañ karantez didrec'hus an Aotrou: "*An doureier meur n'hellfent ket mougañ ar garantez, nag ar stêrioù, he beuziñ.*" (Ka 8,7)

Er Bibl a welomp *etre daouarn santez Anna* e kav hor feiz he gwrizioù. Dre ar Skritur Santel e kendalc'h Doue da gomz ouzhimp evit hol lakaat da zigeriñ hor c'halon ma fell dezhañ sevel enni e annez. Gwechall e reas an Aotrou d'e bobl sevel e annez e Sion hag e teskas dezhi pediñ en ul lec'h dibabet gantañ hag hervez ul liderezh urzhiet gantañ. Hiziv emañ Doue ouzh hor c'houviañ d'en em zizober diouzh an *den kozh* (kv Ef 4,22-24) evit en em anavezout *bugel da Zoue* (kv Yn 1,12). Hor gervel a ra, da heul Jezuz, d'en em zistagañ diouzhimp hon-unan (kv Mk 8,34) evit en em zegemer drezañ; da guitaat pep tra (kv Mz 8,18-22) evit resev pep tra digantañ, en un doare nevez:

donezon ar vuhez, ar vro m'emaomp o chom enni, hon tud kar zoken (kv Mz 19,29) evit o c'harout gwelloc'h ennañ. Hor c'houviañ a ra da zilezel ur pleustrezh relijiel diavaez nemetken (kv Mk 7,1-23) evit azeuliñ *er spered hag er wirionez* (kv Yn 4,24). Sed an hent a gantroidigezh diastal a rank heuliañ pep den, pep pobl o tegemer ar C'heloù Mat. Sed an hent a zigor dimp an neñv ha diskouezet dimp gant santez Anna, ar Bibl etre he daouarn, evel un teñzor kinniget.

### **Holl deñzorioù an neñv etre daouarn santez Anna: Mari ha Jezuz**

Ha tra m'emañ skeudenn santez Anna, ar Bibl etre he daouarn, o c'houverkañ lec'h gougelek met gwerc'hek mamm Mari e steuñv an Aotrou Doue e ro dimp c'hoazh ar skeudennidigezh hengounel o kinnig etre daouarn santez Anna, *Mari o tougen Jezuz*, kaerañ arvest istor an denelezh. Emañ Jezuz ar C'hrist, evit gwir, e kreiz istor an denion: a-raok e c'hanedigezh eus ar Werc'hez Vari edo an denelezh, en un doare kevrinus, o c'hortoz e Endenadur ha hiviziken emañ durc'haet davet e zistro er c'hlod hag e drec'h peurbadel (kv Disk 19,13).

Dre zarvoudoù istor santel Israël, en doa an Aotrou digoret an hent a-benn donedigezh ar Verb en hon touez. E Jezuz Krist, "*skeudenn an Doue diwelus*" (Kol 1,15), ez eo en em ziskouezet karantez Doue evit an dud warbouez dremm un den. Ganet eus ar Werc'hez Vari, merc'h Tiegezh Santel Jeruzalem, en deus bevet Jezuz ar Christ e-kreiz e bobl, evel un den ordinal (kv Phil 2,6-8), hag Eñ Templ gwirion bezañs an Aotrou. Deuet e-touez an dud, en deus tostaet ouzhimp evit hol lakaat da dostaat outañ. Etre divrec'h Mari en em ro Mab Doue da welet evel ur bugelig. En e diegezh e Nazared en deus lodennet hor buhez den. E-doug e vuhez kevredik, en deus diskouezet an Aotrou Jezuz e gendruet ouzh ar bec'herion, ouzh an dud er boan, oc'h embann d'an holl Keloù Mat ar Silvidigezh hag oc'h ober sinoù ha burzhudoù. Deuet da chom er Bobl Dibabet bet desavet gant karantez gwarizius Doue e c'hoarvezas koulskoude gant Jezuz bezañ distaolet ganti ha "*goude bezañ karet e re a oa er bed, en o c'haras betek ar penn pellañ*" (Yn 13,1) oc'h asantiñ reiñ e vuhez evit silvidigezh an dud, o vervel ouzh ar Groaz. Dasorc'het d'an trede deiz, emañ e penn an Iliz ma'z eo ar gristenion, bevaet gant ar Spered a garantez, ar *vein bev anezhi* (cf IP 2,5).

Dre an Emglev Nevez siellet en E Wad en deus gounezet ar C'hrist ar Silvidigezh d'an holl re a laka o feiz Ennañ (kv Rm 3,22). Hiviziken e kendalc'h istor ar Silvidigezh en istor pep den, pep pobl o tegemer ar C'helou Mat. Hiviziken emañ Doue o chom e kalon ar feizidi evit ur c'hendiviz dizehan a garantez gant o Arloz. Hiviziken o deus an dud dor zigor war annez Doue, war

"*dron ar c'hras*" (Hb 4,16). Bez e c'hellont bevañ e Ti Doue ha dre m'emañ ar Spered Santel o chom enno ez eo ar gistenion o-unan hivizihen *Templ Doue* (kv 1 Ko 3,16), hag ez eo o c'horf *Templ ar Spered* (kv 1 Ko 6,19). "*Ma'z eus unan bennak hag am c'har, eme Jezuz, e viro va c'homzoù ha va Zad e garo hag e teuimp davetañ hag e vimp o chom gantañ.*" (Yn 14,23)

E Jezuz a arvestomp outañ, Verb deuet da vout den, gwir Doue ha gwir den, war bleg brec'h Mari, *etre daouarn santez Anna*, test istor Pobl an Emglev, en em ro Doue dimp evit hon unaniñ da vat outañ.

### **Holl deñzorioù an neñv etre daouarn santez Anna: grasoù Doue evidomp**

Maouez eus ar Bobl Dibabet o vukañ he biz war Gomz Doue, mammgozh o tiskouez dimp etre he daouarn Mari gant he Mab Jezuz, ar Verb Enkorfet, deuet da chom e-kreiz Pobl an Emglev, e kinnig dimp santez Anna *holl deñzorioù an neñv*. Dre ar Bibl a welomp *etre daouarn santez Anna*, ez omp galvet da zont e piaou hêrezh grataennoù Doue a zo bet sevenet endeo er Verb deuet da vout den ha gant donezon ar Spered Santel. O sellout ouzh Mari gant Jezuz *etre daouarn santez Anna* ez arvestomp evit gwir ouzh *holl teñzorioù an neñv*, ouzh kevrin karantez Doue hag hi hepken barrek da leuniañ huanad hor c'halon.

Evit gwir ez eo seurt skeudennoù eus ar garantez vamm - santez Anna gant he merc'h Mari hag ar Mabig Jezuz - doareoù dreist da ezteurel meurbet eus teneridigezh hon Doue. Hep mar ez eo evel un tad o kalonekaat hag o tamantiñ bepred, en hor c'har an Aotrou Doue (kv Lk 15,11-32) hag hon gourdrouz ivez (kv Hb 12,5-10) evit hol lakaat da greskiñ. En e furnez, en deus Doue, anat dimp, brientekaet skeudenn an dadelezh: Jezuz, Mab peurbadel Doue deuet da vout den en deus diskuliet dremm drugarezus an Tad hag en deus desket d'e ziskibled E bediñ. Koulskoude, kement ha ma'z eo gwir ne vez bevennet karantez Doue gant hini ebet eus modelezhoù ar garantez den en em ro da anaout ivez gant eztaolad ar vammelezh (kv Os 11, 1-4) ha c'hoazh gant skeudenn karantez ar priedoù (kv Ye 62,5). Ouzh hol lakaat da arvestiñ ouzh kevrin an Enkorfidigezh gwriziennet ma'z eo en istor ha buhez an dud e tigor dimp mamm Mari holl binvidigezh Komz Doue.

Gant santez Anna e vezomp bleniet, evit gwir, e-kreiz an diskuliadur biblek a ziskouez dimp penaos en deus mennet Doue, douget gant e garantez divuzul, en em reiñ da anaout d'an dud dianket dre ar pec'hed, liammañ an Emglev gant ar Bobl Dibabet hag e *dibenn an amzerioù* (kv 1 P 1,20) adunaniñ ar bed a-bezh dre an Emglev nevez ha peurbadel siellet gant gwad e Vab Jezuz Krist. Emglev ar silvidigezh zo dezhañ kemer korf e buhez an dud evit o zreizneuziñ penn-da-benn en o buhez hiniennel, met ivez evit treuzfurmiñ o

buhez tiegezhel, kevredigezhel, armerzhel. Evit ma c'hello mab-den krediñ gant holl berzhioù e zenelezh e rank an Aviel e adneveziñ *en e bezh* ha neuze intrañ e *sevenadur* ivez, eleze hollad ar pezh a vez dedaolet gant e bobl, gant ar strollad tud ma'z eo gougevret outañ, kement tra a ro tu dezhañ da zispakañ leunder an denelezh dre an doareoù da vevañ, an ensavadurioù, an arzoù...

Evel m'en deus Doue bleniet Israël ha desket dezhañ bevañ en e vezañ santel ez eo kouviet hiviziken pep pobl gant an Aotrou da zegemer e garantez ha d'E lidañ dre holl binvidigezhioù e sevenadur goubarzhel. O sellout santez Anna, frouezhenn varzhus desaverezh doueel Israël, en em gavomp evel kouviet ha harpet d'ober eus hor buhez a-bezh, dre Jezuz, un emginnigadenn d'an Tad e nerzh ar Spered Santel. Santez Anna, hag hi test uhel eus enstuzegezh kentañ ar Gomz e Pobl an Emglev a c'hell reiñ he skoazell da bep den, da bep pobl galvet da lidañ an Emglev. Evit gwir emañ *holl deñzorioù an neñv* etre daouarn santez Anna a ro dimp Mari ma teuas betek drezi ennomp, a drugarez d'he asant, ar Salver, Dor nemeti ar silvidigezh, an Nor ma tremen drezi an holl zeñved evit mont davet an Tad. Dre Jezuz *an Nor* e c'hellomp kuitaat touellerezh ar bed evit mont tre e Rouantelezh an Tad dindan lusk ar Spered Santel; kuitaat *Babilon* - ar gêr ma soñj d'an holl komz an hevelep yezh ha ma n'eus mui den ebet evit kompren e vreur - evit mont davet ar bed nevez deraouet gant ar Pantekost ma c'hell pep den entuañ d'an unwirionez en e yezh dezhañ e-unan ha bezañ komprenet gant an holl. Bez' e c'hellomp kaout skoazell digant mamm gozh ar Salver evit chom stag ouzh Dended Santel Jezuz a zo hiviziken hent hon unaniezh ouzh Doue, evit buheziñ en e leunded kevrin an Enkorfidigezh ha neuze digeriñ hor buhez en he fezh da oberenn ar Spered a advaberezh a laka da sevel e kalon pep den ouzh e zegemer hag e-kreiz pep broad, ur c'han nevez a veuleudi d'an Aotrou.

Sed teñzorioù ar c'hras a welomp *etre daouarn santez Anna* hag e c'hellomp en em fiziout en he fedenn gant hon holl ezhommoù speredel ha danvezel rak dindan he faeroniezh emañ an Aotrou Doue o leviañ hon tiegezh speredel hag ouzh e vennigañ evit diorren hor buhez kristen war holl dachennoù hor buhez den, he dispakañ en ur stuzegezh virvidik hag evel-henn mont tre e lid hollvedel ar silvidigezh gant holl bobloù an douar.

### **Hor sell troet davet an neñv**

O tont davedomp *he daouarn karget gant teñzorioù an neñv*, e tro santez Anna hor sell davet kevrin karantez Doue, davet dirvoud speredel annez Doue a zo an neñv ar skeudenn anezhañ. "*An Aotrou en neñvoù en deus*

*diazezet e dron, eme ar salmour, hag e c'halloud-roue en em led war bep tra.*"  
(kv S 102,19).

*Dor an Neñvoù* bet damzigoret evit Israël gant an Emglev Kentañ a voe da Jezuz he digeriñ da vat, evit an holl dud, dre berzh an Emglev Nevez siellet gant e wad. *Eus an neñv* eo deuet (kv Yn 3, 13) evit seveniñ mennantez an Tad (kv Yn 6, 38) hag ez eo distroet di, echuet gantañ e gefridi war an douar (kv Ob 1,9). En neñv emañ azezet hivizikenn en tu dehou da Zoue an Tad (kv Hb 8, 1-2), e klod ha meged an doueelezh hag e ren evel Mesiaz o seveniñ gweladenn Daniel a-zivoud Mab an Den: "*Dezhañ e vo roet ar vestroni, ar meged hag ar rouantelezh hag an holl bobloù, broadoù ha yezhoù e servijo.*" (Dn 7,14)

Dasorc'het, antreet ur wech evit mat e Santual an Neñv, ez eo ar Christ hiviziken "*Beleg Meur ar madoù da zont*" (Hb 9,11), pennrener al lid neñvel (kv Disk 4,6-11) "*ha gant-se e c'hell saveteiñ da vat, ar re a ya drezañ davet Doue, bev ma'z eo bepred da erbediñ evito.*" (Hb 7,25) Da geñver ar groazstagidigezh eo bet roget gouel an Templ (kv Mz 27,51) ha setu m'hon eus hiviziken "*surentez leun da c'halloud antren e-barzh ar Santual dre wad Jezuz.*" (Hb 10,19)

Dre hor feiz er C'hrist Jezuz hon eus, evit gwir, "*perzh en ur c'halvedigezh neñvel.*" (Hb 3,1) a ra dimp bevañ endeo war an douar diwar beziadoù an neñv rak "*a-gevret gantañ ez omp bet lakaet er bez dre ar vadeziant evit mervel, evit dont ni ivez, evel ma'z eo adsavet ar Christ a-douez ar re varv dre nerzh gloar an Tad, da vevañ eveltañ ur vuhez nevez.*" (Rm 6, 4) Ha ni "*kenvroiz ar Sent ha tud eus Ti Doue*" (Ef 2,19) ez omp galvet da berc'hennañ hon anien nevez evit ober diouti endeo war an douar: "*Mard oc'h enta adsavet da vev a-gevret gant ar Christ, eme sant Paol d'ar Goloseidi, klaskit traoù an nec'h, e-lec'h m'emañ ar Christ, azezet a-zehou da Zoue. Lakit ho soñj e traoù an neñv, ha n'eo ket e traoù an douar. Marv ez oc'h evit gwir, hag ho puhez a zo bremañ kuzhet gant ar Christ en Doue.*" (Kol 3,1-3)

Gant donedigezh Jezuz en hor c'hreud, gant e varv hag e zasorc'h o tellezout evit silvidigezh an holl, ez eo kroget, evit gwir, an *amzerioù diwezhañ* (kv Hb 1,2). Er C'hrist, Adam nevez, emañ an Aotrou Doue o sevel un denelezh nevez dre c'halloudegezh ar Spered Santel (Kv 1Ko 15, 46-49). Galvet eo ar gristenion, hag int tud *ganet a nevez* (kv Yn 3,3), *tud nevez* (kv Ef 2,15), da ginnig al *lid speredel* (kv Rm 12,1) *er spered hag e gwirionez*. Seurt azeulerezh zo frouezh hon digoridigezh da oberenn Spered Doue ennomp ha d'hor c'henlabour gantañ, Eñ hag a zeu d'hon dieubiñ diouzh ar c'hreud, "*diouzh lezenn ar pec'hed hag ar marv*" (Rm 8,2), evit hol lakaat da vevañ hervez ar c'hras. Dre e Gomz ha dre nerzh ar Spered Santel e teu Doue da zevoudañ evel un disparti (kv Hb 4,12) etre hon *ene*, pennaenn a vuhez korfel ha bredel, hag hor *spered*, pennaenn a vuhez speredel, evit ma vefe dieubet hennezh en doare ma c'hellfemp mont gant hentoù furnez Doue a dremen dre follentez ar Groaz (kv 1 Ko 1,18).

Dre ar Christ, er Spered Santel, ez eo digor hiviziken Dor Rouantelezh an Neñvoù evit an holl re a gred Ennañ hag a-vremañ en neñvoù emañ bodadeg an holl sent perzhiek e leunded klod Doue. En neñvoù hon eus ni ivez endeo hor chomadur er feiz: "*Ni avat emañ hor bro en neñvoù, eme sant Paol d'ar Filipidi; hag ac'hano e c'hortozomp gant c'hoant bras, hon Aotrou Jezuz Krist evel Salver, eñ hag a dreuzneuzio hor c'horf reuzeudik d'e lakaat kenstumm gant e gorf a c'hloar, dre an nerzh hag ar galloud en deus da lakaat an hollved da sujañ dezhañ.*" (Fil 3, 20-21) Tra ma ne vo peursevenet seurt gwirvoud speredel en e leunded evit an holl re salvet nemet e dibenn an amzerioù ez eo an iliz test eus trec'h hollvedel ar Christ ha benveg ar Silvidigezh evit an holl dud. Gant an Iliz e c'hortozomp donedigezh Rouantelezh an neñvoù war an douar hag e labouromp d'he difraeañ: "*Rak hervez e bromesa, eme sant Pêr, e c'hortozomp an neñvoù nevez hag an douar nevez, lec'h ma vo ar reizhder o chom. War c'hed eus an traoù-se, va re garet, strivit gwellañ ma c'hellfot da vezañ kavet gantañ dinamm ha didamall, er peoc'h.*" (2 P 3, 13-14)

A-drugarez d'he lec'h brientek ha kuzh a-fet sevenidigezh grataennoù Doue, en hon doug santez Anna da eñvoriñ marzhoù Doue en hor buhezioù ha da dreñ hor sell davet an neñv, leun a c'houbeizh hag a fiziañs, o virout en hor c'halonoù an dirgel a garantez a zo o liammañ kement hini ac'hanomp, en un doare dibar, gant hon Tad eus an neñv. Ganti e lavaromp en-dro komzoù Azaria er fornez: "*N'hon dilezit ket a-grenn, abalamour d'hoc'h anv, na freuzit ket hoc'h emglev ganimp. Na zilamit ket diganimp ho trugarez, en abeg d'Abraham, ho kariad, da Isaak ho servijer, ha da Israël ho sant. Prometet ho poa lakaat o diskennidi ken niverus ha stered an neñv, pe an traezh war ribl ar mor.*" (Dn 3,34-36)

### **War an douar evel en neñv**

O sellout ouzh Jezuz war bleg brec'h Mari, *etre daouarn santez Anna, e welomp, evit gwir, holl deñzorioù an neñv evel a-hed-taol dimp. Hor sell troet davet an neñv enta e kerzhomp gant an Iliz, Korf ar Christ, hag hi galvet da zastum enni an holl dud, an holl bobloù ha da anavezout en neñvoù an hevelep klod a zo d'ar Christ he Fenn (kv Yn 14,2).*

Ma n'emañ ket mui Jezuz, en hevelep doare, gant e vreudeur war an douar e chom koulskoude ganto *betek dibenn an amzerioù* (Mz 28,20). Lec'h m'en em vod daou pe dri *en anv Jezuz* en em gav Eñ e-unan, hervez e gomz, en o zouez (kv Mz 18,19-20) hag e tigor neuze an neñv. Dre ar Christ, evit gwir, hon eus, hiviziken, "*dor digor davet an Tad*" (Ef 3, 18) hag ez eus amrederezh frank etre an neñv hag an douar. *Dor an Neñvoù* bet damwelet gant Yakob e Bethel (kv Gn 28,12) zo digor hiviziken evel m'en doa kemennet Jezuz: "*En gwirionez, en*

gwirionez, me ' lavar deoc'h: gwelout a refot an neñv digor hag Aelez Doue o sevel hog o tiskenn a-us da Vab an den." (Yn 1,51) Sed a voe gweledigezh sant Stefan, merzher kentañ an Iliz, da geñver e verzherenti: "Setu, emezañ, ma welan an neñvoù digor ha Mab an den en e sav a-zehou da Zoue." (Ob 7,56)

Evel ma'z eo en neñv en doa diskouezet Doue da Noah ar wareg liesliv, arouez e garusted hag e emglev didorrus gant an denelezh nevez (kv Gn 9,12-13) hag evel ma 'z eo en neñv ivez, da geñver an Emglev Kentañ, e tiskouezas Doue da Abraham ar stered ken diniverus hag ar broadoù a zeufe dioutañ (kv Gn 15,5-6) ez eo en neñv c'hoazh, digoret dre berzh he fedenn (kv Disk 4,1), e c'hell an Iliz gwelout, tro-dro da dron Doue kelc'hiet gant ar ganevedenn, skeudenn diouganel meuleudi ar broadoù bodet dirak an Oan, "tud eus pep meuriad ha pep yezh, ha pep pobl ha pep broad" (Disk 5,9) galvet holl da vont tre e lid an Emglev Nevez.

Hor skoazellañ a ra santez Anna, hag hi merc'h dispar Israël ha mamm Mari, da zegemer kevrin karantez hon Doue en deus oberiet e-kreiz an denelezh hag en deus savet e deltenn en hon touez evit treiñ hor selloù davet an neñv. Desket m'az omp bet gant Jezuz hag hervez e c'hourc'hemenn e ped an Iliz, dindan lusk ar Spered Santel, evit ma vefe graet mennantez an Tad "war an douar evel en neñv" (kv Mz 6,10). Evel ma'z eo sevenet mennantez Doue en neñv e vezo ivez war an douar gant ma pleustrimp hor gouniñverezh belegel gant ar C'hrist Jezuz "en deus graet ac'hanomp ur rouantelezh a veleion da Zoue e Dad" (Disk 1,6) da vezañ "rouaned war an douar" (Disk 5,10) "evit kinnig aberzhioù speredel plijus da Zoue dre Jezuz Krist." (2 P 2,5). "E gwirionez, e gwirionez, me a lavar deoc'h, eme Jezuz, an neb a gred ennon, a raio eñ ivez an oberoù a ran-me; ha reoù vrasoc'h c'hoazh a raio, dre m'emaon o vont davet va Zad. Ha petra bennak a c'houlennfot em anv, a rin, evit m'en devo an Tad gloar en e Vab. Kement a c'houlennfot diganin em anv, me en graio." (Yn 14,12-13)

Ret eo dimp deskiñ ren gant ar C'hrist eleze en em c'hourdonañ da sentiñ ouzh ar Spered Santel. Jezuz E-unan hag Eñ Mab Doue, en deus desket evel Mab an Den ar sentidigezh (Hb 5,8) Hiviziken e sez ar Christ Jezuz en tu dehou d'an Tad en neñvoù ha Doue "en deus hon adsavet da vev hag hon laket d'azezañ en neñvoù a-unan gantañ, ar Christ Jezuz." (Ef 2, 6). E seurt savlec'h a veli - "er Christ" - eo e c'hellomp war an douar entuañ gant mennantez Doue dre ar sentidigezh ouzh luskoù ar Spered ha seveniñ an oberoù en deus merket dimp da seveniñ: "E labour ez omp, krouet ma'z omp bet er C'hrist Jezuz gant Doue, evit dougen an oberoù mat en deus rakdivizet dimp da seveniñ." (Ef 2,10)

Hag hi merc'h Pobl an Emglev ha mamm an Arc'h Nevez, e astenn santez Anna war hon tiegezh speredel gwarez he mantell, o treiñ hor sell davet an neñv steredennet hag o tegas dimp grataennoù Doue evit holl bobloù an douar.

## Banvez an holl vroadoù

Ar C'hrist, hanterour an Emglev Nevez, en deus, dre e aberzh a garantez, dasprenet an trozadurioù c'hoarvezet da-geñver an Emglev Kentañ hag e ro tu d'an holl da zegemer an hêrezh bet grataet endeo (kv Hb 9,15) Ennañ o deus an holl dud, an holl bobloù dor zigor war ar silvidigezh (kv Rm 10) "*O vezañ bet enta laket reizh dre ar feiz, eme sant Paol, emomp e peoc'h gant Doue dre hon Aotrou Jezuz Krist, hon eus drezañ dor-digor d'ar c'hras-se a chomomp start enni hag a dennomp lorc'h diouti gant goubeizh klod Doue.*" (Rm 5,1)

Emañ ar bed o c'hortoz an adunvanidigezh gant Doue bet gounezet dimp endeo gant ar Christ Jezuz hag a zo da vezañ degemeret gant pep den, gant pep pobl hervez ar frankiz lezet dezhañ gant Doue. E kalon pep den, e kalon sevenadur pep pobl, e kaver, evit gwir, an iziunad d'ur bed adkavet gantañ ar gendoniezh gant Doue. Dre e ziouganer Yeshaia en doa kemennet an Aotrou Doue e aozfe war Venez Sion *ur banvez evit an holl vroadoù* (Ye 25,,6), gloez Doue gant an denelezh adunanet gantañ, banvez burzhudus o seveniñ erbar salvus Doue war an holl vroadoù. Seurt diawelad eskatologel o tiskuliañ raktres marzhus Doue war an denelezh gloazet gant ar pec'hed, zo sevenet endeo en un doare kevrinus er Christ Jezuz, Verb deuet da vout den. Hag evit diskuliañ kevrin Rouantelezh an Neñvoù d'e ziskiblbed, en deus he c'heñveriet Jezuz d'e dro peurgetket ouzh banvez ur roue (kv Mz 22,2), *Banvez eured ar Mab ma kemero perzh ennañ an holl re o devo respontet dre ar feiz ouzh kouviadenn ar Roue* (kv Lk 22, 30). Dre e Endenadur ez eo evit gwir evel dre un dimeziñ en deus en em unanet Verb Doue ouzh an denelezh hag eured an Oan gant an Iliz E Bried zo anezhañ peursevenidigezh an Emglev Nevez: "*Bezomp laouen ha tridomp, roomp gloar dezhañ, rak setu deuet eured an Oan hag e bried a zo en em gempennet, ha roet eo bet dezhi en em wiskañ gant lin tanv skedus ha glan.*" (Dsk 19, 7-8)

Bennozh da oberenn ar Spered Santel en o c'halon e c'hell hiviziken ar feizidi eus pep yezh hag eus pep sevenadur kemer perzh e kevrin dimeziñ Doue gant an denelezh en ur genunaniezh e liamm glann ar garitez (kv Kol 3,14). O lidañ Doue gant holl berzhioù mat o sevenadur bet glanaet ha frouezhusaet gant had an Aviel e c'hellont klodekaat Doue gant holl c'hallusterioù o buhez den. Dre berzh ar sevenadur kristen buhezet dindan c'hwezh Spered ar Pantekost e c'hellont degemer karantez Doue en holl dachennoù o buhez. Gant kasadenn ar Spered Santel *en devezhioù diwezhañ-mañ* emañ sevenet, evit gwir, kemenn Yoel (kv Ob 2,17) ha diougenoù all an Emglev Kentañ o kemenn ur bed adunanet gant Doue (kv Za 14, 20) hag e c'hell hiviziken ar gristenion lidañ Doue oc'h ober pep tra "*bepred en anv Jezuz Krist, en ur rentañ bennozh drezañ da Zoue an Tad.*" (Kv Kol 3,17) A-drugarez da *enstuzegezh* ar feiz, anezhi frouezh labour ar Spered e kalon ar feizidi, e c'hell pep den ober eus e vuhez a-bezh ul *lid* a drugaregezh d'an Doue Krouer ha Salver. Ha galvet ez eo pep

pobl da lidañ donezon ar vuhez nevez hervez he ijin dezhi he-unan ha da zegas he mouezh dibar da gan ar pobloù a rank sevel eus an douar a-bezh.

Evit erzerc'hañ hag seveniñ endeo adunanidigezh an denelezh gant Doue en deus ensavet Jezuz, hag-Eñ Oan Doue a zilam pec'hed ar bed, *Banvez an Eukaristiezh* ma adneveziñ en he c'heñver, en un doare kevrinus, E Aberzh a Garantez betek E Zonedigezh er c'hlod ha m'en em ro da vagadurezh d'e vignoned. Gant an Eukaristiezh emañ Jezuz o chom, evit gwir, e-kreiz e bobl, e Gorf Kevrinel ma'z eo Eñ ar Penn anezhañ hag enni e tastum an holl bobloù evit un drugarekadenn liesseurt o sevel davet an Tad dindan c'hwezh ar Spered Santel.

Penhêrez grataennoù Doue e-keñver an Emglev Kentañ ha mamm-gozh Hanterour an Emglev Nevez, santez Anna hor c'houvi da vanvez ar silvidigezh. Emañ ouzh hon pediñ da gemer, e Jezuz Krist, an hêrezh a zo "*miret en neñvoù*" (1P 1,4) evidomp hag e ro he skoazell dimp evit lakaat seurt donezon da zougen frouezh en hor buhez evit brasañ klod an Tad (kv Yn 15,8).

### Listri priaj

Skeiñ a ra Doue ouzh dor kalon pep den evit dont da chom gantañ (kv Dsk 3,20). Dre E Gomz e kouvi pep pobl da lidañ dimeziñ Doue gant an denelezh o vont tre hi he-unan e lid hollvedel ar silvidigezh gant holl binvidigezhioù he sevenadur. Hor skoazellañ a ra santez Anna da vont dreist d'an aon a zo ennomp a-benn degemer an teñzor a fell da Zoue fiziout ennomp, etre hon daouarn. "*Met an teñzor-se, eme sant Paol, a zougomp e listri-priaj, ma vo anat e teu eus Doue ar galloud-se dreist-hini ha n'eo ket ac'hanomp-ni.*" (2Ko 4,7) En hor gwander eo e fell da Zoue, evit gwir, dispakañ e nerzh (kv 2 Ko 12,9b-10), *listri priaj* ma'z omp o tougen ennomp evelkent teñzorioù an neñv bet fiziet ennomp gant Doue hag a blij dimp, en hon tiegezh speredel, sellout outo *etre daouarn santez Anna*.

E-kreiz diaesterioù ar vuhez-mañ ez eo galvet ar gristenion da vuheziñ a-vremañ grataennoù Doue ha da zifraeañ dre ar bedenn ha dre o buhez engouestlet da heul ar C'hrist ar mare ma vo kanet klod Doue gant an holl bobloù. Al *listri priaj* ac'hanomp zo merket endeo gant siell Doue: "*Merket oc'h bet evel gant ur siell, eme sant Paol d'an Efezidi, gant Spered ar Bromesa, ar Spered Santel, eñ hag a zo ennomp arrez hon hêrezh, hag a labour da zieubidigezh ar bobl en deus Doue gonezet dezhañ e-unan, evit meuleudi e c'hloar.*" (Ef 1,13-14)

E Santual an Neñv emañ bepred ar Christ oc'h erbediñ evidomp dirak an Tad hag ez eo E zended klodekaet da viken evel ur melezour a laka da barañ warnomp gouloù Doue dre zonezon dizehan ar Spered Santel a ra dimp tamm-

ha-tamm dameuc'hiñ gouloù Doue. "*Ha ni holl, eme sant Paol d'ar Goloseidi, pa skeudennomp war hon dremmoù dizolo, evel en ur melezour, gloar an Aotrou, e vezomp troet er skeudenn-se a zeu da vezañ ennomp splannoc'h-splannañ, dre labour an Aotrou a zo spered.*" (II Ko 3, 18)

Al listri priaj ac'hanomp zo galvet gant Doue da vezañ "*listri a drugarez ragaozet gantañ evit ar C'hloar*" (Rm 9,23) Hag e pep degouezh ez omp galvet d'en em fiziout e Ragevezh Doue rak "*gouzout a reomp emañ Doue o kenlabourat e pep tra evit o mad gant ar re Er c'har, gant ar re en deus dibabet en e vennad. Rak ar re en deus anavezet a-ziarak eo ar re en deus rakverket da vezañ heñvel ouzh patrom e vab, evit ma vo eñ ar mab-henañ da vreudeur e-leizh.*" (Rm 8, 28-29)

Lakaet gant Doue dindan gwarez santez Anna e fell dimp, en ur lezel nerzh Doue da leuniañ hor paourentez, dont da vezañ *oberourion ar Gomz* (Jk 1,22-25) hag ober eus hor buhez a-bezh ul lid ma kej ar feiz gant ar sevenadur oc'h erzerc'hañ evel-henn unvaniezh Doue gant hor pobl ha testeniañ eus Kelou Mat ar Christ.

### **Laouenaomp Kalon hon Doue**

Doue hag a fell dezhañ salviñ an holl dud (kv 2 P 3,9) hag ober eus an Iliz an "*Ti a Bedenn evit an holl vroadoù*" (Mk 11, 17) en deus graet ac'hanomp kevelerion an istor emañ o skrivañ ganimp evel ma reas gwechall gant izili e Bobl Dibabet "*a voe lakaet nerzhus, a voe pareet eus o c'hleñvedoù hag o deus en em ziskouezet galloudek er brezel*" (Hb 11,34).

Emouez ma'z omp, dre c'hras Doue, ouzh hor gwander, ouzh hon divarregezh hag ouzh hor pec'hed e rankomp fiziout bepred en Aotrou o c'houzout e c'hell ober ennomp "*ar mennout hag an ober, hervez ma plij d'e drugarez.*" (Fil 2,13) Dre hor pedenn emañ hon daouarn war stur ar bed gant Doue hag e c'hellomp, evit gwir, kendeurel da sevenedigezh mennantez an Tad war an douar evel en neñv o terc'hel da vezañ unanet ouzh Jezuz dre nerzh ar Spered Santel.

O welout ergentaou ar steredenn o kemenn ar Salver e voe karget ar Vajed a levenez vras (kv Mz 2,10). O sellout ouzh an neñv ez arvestomp ouzh ar stered, anavezet gant Doue pep hini dre e anv (kv S 146,4), disheñvel o lugern an eil re diouzh ar re all (kv I Ko 15,41), hag oc'h aroueziañ ar pobloù liesdoare galvet da levenez ar Silvidigezh (kv S 66,5). Pep hini zo dezhi reiñ he mouezh e sonadeg ar veuleudi zo dezhi sevel davet Doue eus an Douar a-bezh; pep hini zo dezhi lakaat he liv da skediñ war ar sae eured gwisket gant an Iliz evit he Fried. Hag e c'hoarvez dimp evel ma klevfemp mouezh an Aotrou o lavarout dimp: "*Va bugel, ro klod din gant da vuhez a-bezh. Deus davedon gant holl binvi-*

*digezhioù sevenadur da bobl. Kan ha koroll dirazon en anv da bobl. Karout a ran da bobl. Karout a ran da vro. Sell en neñv ar steredenn merket dezhi. Hiziv va mab ro klod din gant sevenadur da vro. Kar ganin da vro. Kar ganin an holl vroioù galvet da ganañ va c'hlod. Degas da vouezh dibar da gan ar pobloù"*


Ha ni, bet lakaet gant Doue dindan gwialenn-vesa santez Anna, merc'h dispar ar Bobl Dibabet ma enkorfas Verb Doue e Mari he merc'h, fellout a ra dimp respont da c'halvadenn a garantez hon Doue ha laouenaat E Galon o veuliñ hor C'hrouer ha Salver gant pinvidigezhioù sevenadur hor pobl e-kreiz an Iliz, anezhi Pobl an Emglev e pep bro o vodañ enni an holl bobloù en anv ar Christ evit skuilhañ e pep lec'h "*frond e anaoudegezh.*" (2 Ko 2, 14)



Hag hi merc'h Abraham ha mamm Mari an hini Dinamm, Mamm Salver an holl dud, ez astenn santez Anna he damant a vamm war an holl bobloù galvet da lidañ Emglev hollvedel ar Silvidigezh. Bodet dindan mantell steredennet hor paeronez eus an neñv e pedomp evit ma c'hounezo burzhud ar Pantekost an holl vroadoù - Doue oc'h en em ziskuliañ d'an holl, en holl yezhoù hag en holl sevenadurioù - hag e tougomp trugaregezh "*d'an Hini a c'hell gant e c'halloud o labourat ennomp ober mil gwech en tu-hont d'ar pezh a c'houlennomp pe a soñjomp zoken, dezhañ ar c'hloar en Iliz hag er Christ Jezuz, evit holl rummadoù an holl gantvedoù ! Amen.*" (Ef 3, 20-21)

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...



... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...  
... an der ... in der ...

## Dezvadoù

# *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna*

### Genezh

Ur *genunaniezh* feizidi dindan baeroniezh santez Anna, Mamm ar Werc'hez Vari, ez eo *Tiegezh Santez Anna* e tiegezh meur *mignoned Jezuz* a zo an Iliz, lec'h ma fell dezho bevañ, neshent ouzh Mab Doue, dindan lusk ar Spered Santel, evit klod an Tad.

Galvet eo izili ar *Genunaniezh* da vont tre e lid hollvedel an Emglev etre Doue hag an dud o tispakañ o feiz en atil sevenadur o fobl en doare da gemer perzh e kensonadeg pantekostel ar broadoù o tegas d'an Aotrou holl binvidigezhioù o sevenadur goubarzhel.

### Dañ

Izili *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna*, hag int o vevañ pe e *breuriezhoù-annezel*, pe *kileed* pe c'hoazh *enkoulmidi* zo galvet holl da zegemer c'hwezh ar Spered Santel evit mont tre e lid sevenadurel meur an Emglev deraouet gant ar Pantekost o lidañ Doue an Emglev gant doareoù dibar o sevenadur hengounel hag en doare da gemer perzh e *Banvez ar Rouantelezh* gant pinvidigezhioù enstuzegzh ar feiz en o fobl anezho o laouenaat Kalon Doue.

Dindan gwarez santez Anna, Mamm Mari, ez int galvet da selaou Komz Doue er bedenn, d'en em vegañ eus an Eukaristiezh hag da vevañ diouzh gras ar sakramantoù all, da zoonat o feiz gant skoazell kelennadurezh an Iliz, en doare da wriziennañ o buhez e buhez an Iliz anezhi pobl an Emglev e pep bro o tastum enni an holl bobloù.

Tro-dro d'ar *breuriezhoù-annezel* ha war un dro gant ar *gileed* ez eo galvet *enkoulmidi* (1) ar *Genunaniezh* da stummañ ur rouedad feizidi, roet d'ar bedenn ha d'an abostolerezh, diouzh gras pep hini, o tispakañ o buhez kristen en atil sevenadur o fobl.

(1) Ar ger *enkoulmad* a dalvezo amañ da-heul enta evit izili *enkoulmet end-eeun* er *Genunaniezh* a-ziforc'h diouzh *emouesltidi* ar *breuriezhoù-annezel* ha diouzh ar *gileed*.

## Araezioù kinniget d'an *enkoulmidi*

*Enkoulmañ e Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a dalv bezañ mennet da vuheziñ en e vuhez pemdeziek ar c'halvadenn varzhus da zispakañ e feiz kristen en e sevenadur, unanet ouzh hon tiegezh speredel, dindan baeroniezh santez Anna.

D'an *enkoulmidi* e vo kinniget un nebeud araezioù en doare da vezañ harpet en ho *enkoulm* ha da gejañ an eil re gant ar re all, hervez hegerzted pep hini: emvodoù pediñ gant kelennadennoù, pirc'hirindedoù, ur c'hannadig...

Hogen ar pezh a welor eus buhez ar *Genunaniezh*, emvodoù hag obererezhioù diseurt, a vo gwriziennet e buhez diabarzh a bedenn hag a azeulerezh *Tiegezh Santez Anna*, dalc'het peurgetket e-kreiz hon tiegezh speredel gant ar *breuriezhoù-annezel* lec'h ma c'hello an *enkoulmidi* hag ar *gileed* pergen mont da dremen prantadoù a vuhez kumuniezhel.

## *Enkoulmañ*

Bez e c'hell *enkoulmañ e Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* kement kristen badezet a oad gour a c'houlennno bezañ degemeret enni gant ma vo diverzet e c'halvadenn gant atebion ar *Genunaniezh* ha ma vo mennet ar goulennad da vevañ diouzh gras hon tiegezh speredel evel ma vez eztaolet en teulioù diazez anezhañ.

Tud dizimez ha tud dimezet a vo tu dezho *enkoulmañ*, met ma c'hoarvez koulskoude ne vefe nemet unan bennak eus ur c'houblad a fellfe dezhañ emezelañ e ranko an hini all reiñ e asant.

D'an hini mennet da anavezout *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* ha marteze da *enkoulmañ* enni e vo kinniget dezhañ kemer perzh en emvodoù pe daremprediñ ur *vreuriezh-annezel* e-pad ur pennadig amzer ha lenn an teulioù diazez.

An hini a fello dezhañ *enkoulmañ* a ranko mont e darempred gant un ezel eus *Kuzul Tiegezh Santez Anna*. Mat e vo d'ar goulennad sevel ul lizher lec'h m'en em zisklerio. Ur wech diverzet e c'halvadenn gant ar *C'huzul* e c'hello ar goulennad neuze *enkoulmañ*.

Ar goulennad a raio diouzh boaz e *enkoulm* da geñver un emvod eus ar *Genunaniezh* pe c'hoazh en ur *vreuriezh-annezel*.

Ur wech *enkoulmet* er *genunaniezh* e chom dieub avat an *enkoulmad* da zilezel e *enkoulm* forzh pegoulz.

E dibenn emvodoù ar *Genunaniezh* e lavaro an *enkoulmidi* holl a-gevret o fedenn enkoulmañ.

## DOARE BEVAÑ

Galvadenn *enkoulmidi Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* da vont-tre e lid sevenadurel meur an Emglev deraouet gant ar Pantekost gant pinvidigezhioù enstuzegezh ar feiz en o bro a vo buhez ganto dre o enkoulm - anezhañ speredel da gentañ holl - e stern ar *Genunaniezh* m'emaint unanet enni kenetrezo dre un hevelep pedenn ha dre un hevelep engouestl da heul ar C'hrist Jezuz.

Kavout a raint e *Karta a Garitez* hag e *Levr Emglev ar Genunaniezh* ur skoazell evit degemer enno c'hwezhadenn ar Spered Santel ha bevañ o galvadenn hervez enstuzegezh ar feiz en o fobl ma roio *Levr Burzhudoù an Aotrou* en o bro un adsked anezhi.

Setu c'hoazh, amañ da heul, elfennoù pennañ o *enkoulm* speredel hag an nebeud kinnigoù pleustrek ma vo aesoc'h bevañ diouto gant skoazell ar *Genunaniezh*.

### **- Bevañ dindan c'hwezh ar Spered Santel**

Bemdez en em gavo *enkoulmidi* ar *Genunaniezh* unanet er bedenn evit degemer grasoù ar Pantekost en o buhez en doare ma vo nevesaet burzhudoù Doue en o fobl ha ma vo lidet an Emglev gant doareoù dibar o sevenadur.

O *enkoulmidigezh* a dalvezo dezho kreskiñ atav e buhez ar c'hras ha sevel en o c'hreiz ar Feiz, ar Goubeizh hag ar Garitez.

### **- Sevel ur vuhez pediñ harpet war gomz Doue**

Mennet da vezañ mignoned da Zoue en o bro e vo aketus *enkoulmidi* ar *Genunaniezh* da gaout ur gwir vuhez pediñ evit bevañ muioc'h mui eus buhez Doue Tad, Mab ha Spered Santel.

Degemer a raint kelennadurezh an Aotrou Krist a-zivout retvez ar bedenn hiniennel hag ar bedenn strollel, kevret gant o breudeur gristen.

Daoust ma c'hell bezañ dister en deroù an amzer a ouestlint d'ar bedenn e klaskint aozañ koulskoude ur vuhez pediñ reoliek en ur vezañ feal d'o disentezioù hag o klask dizoleiñ ar bedenn evel ma vez buhez e *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* (ar veuleudi, lennadenn Komz Doue, an orezon, pedenn ar Rozera, azeulerezh ar Sakramant...).

Dreist pep tra e klaskint diorren ar veuleudi en o buhez ha chom bepred dindan sell karantezus Doue.

Hervez annougadenn sant Paol e raint "goulennoù, pedennoù, gourfedennoù, trugarekadennoù, evit an holl dud, evit ar rouaned hag an holl re o terc'hel an aotrouniezh, evit ma c'hellimp ren er peoc'h ur vuhez sioul, e pep doujañs-Doue ha briegezh." (1Tm 2, 1-2)

War un dro gant pediñ evit o bro dre hanterouriezh santez Anna hag ho holl sent e pedint evit ma vo meulet anv Doue gant holl bobloù an douar.

#### - Bevañ o galvadenn e kreiz an Iliz

Dastumet evel *pobl Doue* hervez galvidigezhioù disheñvel ez eo galvet izili ar *Genunaniezh* da lezel ar Spered Santel d'adneveziñ o buhez hervez ar *Gwenvidigezhioù* (Mzh 5, 3-12) anezho lezenn ar Rouantelezh Nevez. Meizet ganto, dindan skêrijenn ar Spered Santel, ez eo empleget er garantez emginnig gwirion pep unan anezho, e vezint laouen oc'h ober diouzh alioù an Aviel hervez o hentadur hinienel, o stad-vuhez hag he darvennadoù ilizel,; ar c'hlanded, ar baourentez, ar sentidigezh *evit plijout da Zoue* diazezet war arglask an hesented karantezus ouzh ar Spered Santel.

#### - Bevañ diouzh ar sakramantoù

Evit meuliñ o C'hrouer hag o Salver dre o buhez a-bezh ez eo galvet *enkoulmidi* ar *Genunaniezh* da buñsañ ouzh eienenn ar sakramantoù. Roet e vo dezho da anaout diferadurioù reol an Iliz a-fet buhez sakramantel evit o buheziñ e gwirionez o toujañ ivez ouzh hentadur pep hini.

#### - Bevañ dindan baeroniezh santez Anna

Galvet eo *enkoulmidi Tiegezh Santez Anna* da vevañ diouzh gras paeroniezh santez Anna o tegemer drezi ar Werc'hez Vari evit en em reiñ penn da benn da Jezuz he mab a zo deuet da lodennañ hor buhez den evit hol lakaat da gemer perzh e buhez Doue ha da zougen klod dezhañ dre hor buhez treuzneuziet gant ar c'hras. Fiziout a raint enta e santez Anna labour enstuziañ ar feiz kristen a zo e kreiz galvadenn ar *Genunaniezh*.

#### - En em ouestlañ d'ar Werc'hez Vari

Evit degemer gwelloc'h labour adneveziñ ar Spered Santel en o buhez e vo kinniget da *enkoulmidi Kemunaniezh Tiegezh Santez Anna* en em ouestlañ d'ar Werc'hez Vari a zo d'an Iliz "patrom war dachenn ar feiz, ar garitez hag an unaniezh peurvrat gant ar C'hrisť." (Lumen Gentium 63.)

Goulenn a raint ouzh santez Anna ar c'hras da gehelañ Kalon Dinamm Mari en doare da dostaat muioc'h-mui ouzh Kalon Jezuz ha da vezañ kemmet gant gwrez e Garantez.

### - Buhez an tiegezh speredel

*Enkoulmidi Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna*, unanet kenetrezo dre ar bedenn ha dre o galvadenn gevredin, a vo kinniget dezho diouzh o stad-buhez hag o hegerzded: kemer perzh en emvodoù reoliek a ranko dont da vezañ un devetegezh en o buhez; daremprediñ *breuriezhoù-annezel Tiegezh Santez Anna*; en em vagañ eus teulioù diazez ar *genunaniezh*; harpañ oberennoù ar *genunaniezh*.

### - Lidañ o Doue ha bezañ testoù eus ar C'hrist Salver

*Enkoulmidi Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a glasko ober eus o buhez a-bezh ul lid lec'h ma kejo ar Feiz gant ar sevenadur evit lidañ hag embann kevrin ar C'hrist Dasprener hag erzerc'hañ diwar-henn unvaniezh Doue gant e bobl. Neuze e testeniint tro-dro dezho eus o feiz gwriziennet ha dispaket e sevenadur o fobl.

## Levieriezh

### - Kuzul Bro

E pep pobl pe hennvoud sevenadurel lec'h ma vo diorreet ar *Genunaniezh* e vo savet ur *C'huzul Bro* a skoazello da bleustriñ galvadenn gevredin *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna*

Hervez diorroidigezh ar *Genunaniezh* e vo kadoriet ar *C'huzul Bro* gant *Kerreizher* ar *breuriezhoù-annezel* pe gant penntieg ar *vreuriezh-annezel* (ma n'eus nemet unan) hag e vo ennañ *penntieien* ar *breuriezhoù-annezel* (ma' z eus meur a hini), *atebeion* ar *stummidigezh* hag *mevelion bras* ar *breuriezhoù-annezel*, ma'z eus ezhomm izili all eus ar *breuriezhoù-annezel* (dilennet er *breuriezhoù* evit daou vloaz), izili ar *Genunaniezh*, *enkoulmidi* pe *gileed* (dilennet gant ar *C'huzul* evit tri bloaz) o terc'houezañ ar rannvroioù pe obererezhioù diseurt ar *Genunaniezh*.

Er pobloù lec'h ma vo ensezet ar *Genunaniezh* hep kaout c'hoazh ur *vreuriezh-annezel* e vo savet ur *C'huzul Bro* a vo kadoriet gant un *dileuriad* (anvet gant ar *C'herreizher Meur* pe ar *C'herreizher* evit daou vloaz) hag a vo ennañ derc'houezidi ar rannvroioù pe an obererezhioù ezholet gant an *dileuriad*.

Div wech ar bloaz pe muioc'h, diouzh an ezhommoù, en em vodo ar *C'huzul Bro* evit pediñ ha deznadiñ mennantez Doue war ar *Genunaniezh*

diouzh degouezhioù ar mare, daskoriñ kont eus he diorroidigezh, danevellañ an oberezhioù anezhi.

Kinniget e vo ar re o devo goulennet enkoulmañ. Pep *Kuzul Bro* a zalc'ho ur c'haier ma vo skrivet ennañ anvioù an *enkoulmidi* hag ar *gileed*.

Evezhiek e vo ar *C'huzul Bro* da virout an unaniezh etre an *emouestlidi*, ar *gileed* hag an *enkoulmidi* anezho galvet holl da stummañ *ur bobl unanet o lidañ he Aotrou*.

Galvet eo pep *Kuzul Bro* da studiañ, mirout, herouezañ glad sevenadurel rannad an denelezh bet roet gant Doue da zamantiñ dezhañ o werediñ war enstuzegezh ar feiz dindan lusk ar Spered Santel. Evezhiek e vo da harpañ eztaolerezh sevenadurel pep rannvro e dolead dezhañ e-unan, da gentradiñ arver ar yezh lec'hel, da lakaat war wel an hengounioù diles e sklêrijenn an Aviel.

O reiñ testeni eus *lid sevenadurel an Emglev* en e sevenadur dezhañ e-unan hag eus istor ar santelezh en e bobl, e labouro pep *Kuzul* da sevel *Levr burzhudoù Doue* en e vro a ranko kaout darbennadur ar *C'herreizher* pe hini ar *C'huzul Meur* ma'z eus anezhañ.

#### - **Kuzul Meur**

Pa vo diorreet ar *Genunaniezh* e meur a bobl e vo savet ur *C'huzul Meur* kadoriet gant an *diazeour* pe gant ar *C'herreizher Meur* hag a vodo ennañ *penntieenn* ar *breuriezhoù-annezel* ha dileuridi ar *C'huzulioù Bro* (daou dileuriad dilennet e pep *Kuzul Bro* anvet evit daou vloaz).

Pal ar *C'huzul Meur* a vo:

- gwareziñ, o taveiñ da deulioù diazez ar *Genunaniezh* ha da spered an diazezidigezh, ouzh glad speredel ar *Genunaniezh* en he genezh, he fal, he spered, he doareen dezhi he-unan hag ivez he hengounioù diles;

- herouezañ, o toujañ d'an hengoun, azasidigezh ha nevezidigezh ar vuhez breuriezhel hag abostolek er *Genunaniezh*;

- skarat war ziazezidigezh pe loezadur ur *C'huzul Bro* hag araezañ pep daskemm er reoliadurezh.

- reiñ e skoazell da bep *Kuzul Bro* evit sevel e *Levr Burzhudoù an Aotrou* ha reiñ e zarbennadur a-raok ma voe embannet.

## Lid an enkoulmidigezh.

Al lid *enkoulmañ* a vo graet peurriesañ da geñver un emvod eus ar *Genunaniezh* pe c'hoazh e stern ur *vreuriezh-annezel*.

Goude ur prantad pediñ a-stroll e c'hello ar *C'herreizher* distagañ un tamm kelennadenn a-zivout galvadenn *Tiegezh Santez Anna*. Galvet e vo neuze an danvez *enkoulmidi* dre o anv hag en em strollint dirak ar vodadenn. Daoulinañ a raint. Kanet e vo letanioù ar sent. Da c'houde e tistagint a-gevret o *fedenn enkoulm*.

*"Hon Tad eus an neñv, kaset hoc'h eus ho Mab er bed evit hor salviñ dre E Groaz Santel hag hon dieubiñ diouzh sklavelezh ar pec'hed.*

*Salver Jezuz, dasprenet hoc'h eus gant ho kwad tud eus pep pobl, eus pep yezh, evit ober anezho Pobl Doue.*

*Spered Santel emaac'h o lakaat da sevel e kalon pep pobl ar c'han nevez dre Jezuz Krist evit klod an Tad.*

*Bennozh deoc'h Aotrou Doue evit ar silvidigezh kinniget dimp, bennozh deoc'h evit ho trugarez!*


*Leun a drugaregezh evit hoc'h oll vadoberoù, me va anv... a fell din hiziv enkoulmañ e Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna hag hi e-barzh tiegezh meur Jezuz a zo an Iliz.*

*Dindan gwarez santez Anna e vennan kerzhout war hent ar Pask, degemer drezi ar Werc'hez Vari evit bevañ neshent ouzh Jezuz dindan lusk ar Spered Santel.*

*Mennet on da zegemer bemdez-Doue c'hwezh ar Spered Santel ha da vont tre e lid meur an Emglev deraouet da geñver ar Pantekost o kanañ meuleudi an Aotrou dre va buhez a-bezh gwriennet ha dispaket e sevenadur va fobl.*

*Bennozh deoc'h Aotrou Doue c'hwi hag a ra pep tra nevez gant c'hwezh ar Spered Santel !*

*En em fiziout a ran e santez Anna evit kreskiñ en anaoudegezh hag e karantez Jezuz Krist gwir Doue ha gwir den, ganet eus ar Werc'hez Vari hor Mamm hag hor Rouanez hag e c'houlennan pedenn va breudeur."*



Kanet e vo ur meulgan d'ar Spered Santel. Degemeret e vo Komz Doue.  
Kanet e vo da santez Anna ha d'ar Werc'hez Vari ha tu a vo da genderc'hel  
gant ar veuleudi. Sinet e vo gant an *enkoulmidi* nevez ar marilh arbennik  
dalc'het gant ar *C'huzul Bro*.

**"Meulit an Aotrou, c'hwi an holl vroadoù,  
youc'hit dezhañ c'whi an holl bobladoù:  
Rak divrall eo warnomp e drugarez,  
fealded an Aotrou a bad da virviken ! Allelouia !"**

(S 116)



## *Dezvadoù Kileed Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna*

### Bezañ kile e Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna

Bezañ kile e *kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* a dalv buheziñ ur wir *engouestladenn* gristen gant arvezioù kumuniezhel, e *kenunaniezh* gant ur *vreuriezh-annezel* eus *Tiegezh Santez Anna*, en un doare gwevn hag azasaet ouzh pep hini, hervez un *emgleviad hiniennel* savet gant ar *c'hile* diouzh krefen boutin d'an holl, en doare da vuheziñ muioc'h-mui ar c'halvadenn varzhus da lidañ Doue an Emglev dre e vuhez gwriziennet ha dispaket en e sevenadur.

### Dazennoù ardreuziñ etrezek an engouestl

Bez e c'hell dont da vezañ kile e *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna* kement kristen badezet a oad gour mennet da vevañ diouzh gras hon tiegezh speredel - evel ma vez eztaolet en teulioù diazez anezhañ - ha ma vo deznadet mat e c'halvadenn d'ar vuhez *kile*.

Aliet e vo an danvez *kile* da vuheziñ da gentañ an *enkoulmidigezh* er *Genunaniezh* hogen tu a vo ivez da zont da vezañ *kile* war-eeun.

An danvez *kile* a c'hello sevel e c'houlenn ouzh unan eus atebieion ar *Genunaniezh*. Neuze e vo lakaet e darempred gant un ezel eus ur *vreuriezh-annezel* a zeuio da vezañ e ambrouger evit diverzout gantañ e c'halvadenn d'ar vuhez *kile*. Da c'houde e kinnigo an ambrouger ar goulennad d'ar C'huzul a ranko reiñ e asant.

Ur wech roet e asant gant ar C'huzul e c'hello an danvez *kile*, gant skoazell e ambrouger, sevel un *emgleviad hiniennel* diouzh ar c'hrefen amañ da heul, kinniget d'an holl *gileed*.

Ar *gileed* a raio o *engouestladenn* evit daouzek miz, peurliesañ en diskar-amzer. Aesoc'h e vo dezho peurliesañ, sevel o *emgleviad* e-pad an hañv

pe dres da geñver an distro, ur wech anavezet ganto o amzeriadur evit ar bloavezh.

Bez e c'hello an danvez *kile* sevel un *emgleviad* hag *engouestlañ* evit ur prantad da c'hortoz koulz an distro.

Neoazh e c'hello ur *c'hile engouestlañ* evit daouzek miz d'ur c'houlz all eus ar bloavezh.

Deziadet e vo an *emgleviad* ma vo savet teir skouerenn anezhañ, skrivet warnañ anv ar *c'hile*, e chomlec'h hag ivez anv e ambrouger.

Hiniennel rik ez eo an *emgleviad* zoken evit pep ezel eus ur c'houblad hogen tu a zo da sevel un *emgleviad* ouzhpenn evit ur c'houblad.

Lod *kileed*, c'hoant ganto d'ober hent a-gevret a c'hello ivez sevel strolladoù o devo un *emgleviad* o talvezout evit ar strollad-mañ strollad.

Roet e vo an *emgleviad* da benntieg ar *vreuriezh-annezel* a c'hello goulenn e vefe kemmet tra pe dra a-raok reiñ e asant.

Pep *kile* a raio e *engouestladenn* e-doug ul lid (gw. amañ da heul) peurliesañ da geñver un emvod eus ar *Genunaniezh* en diskar-amzer met tu a vo ivez d'ober e *engouestladenn* d'un degouezh all..

Ma'z eus ezhomm e c'hello ar *c'hile* kemm e *emgleviad* e-doug ar bloavezh. Kement-mañ zo da vezañ gwelet gant an ambrouger a gelaouo ar penntieg.

Bez e c'hello ivez ar *c'hile* goulenn kaout un ambrouger all, barrekoc'h marteze d'e skoazellañ.

Dieub e chom bepred ar *c'hile* da zivizout paouez gant e *engouestl* e-doug ar bloavezh.

## Un engouestladenn war argresk

*Engouestl* ar *c'hile* zo dezhañ herouezañ e vuhez kristen o reiñ dezhañ an tu da heuliañ un hentadur frouezhus war an dachenn kristen, denel ha sevenadurel.

E sell da vont tre e lid an Emglev gant e sevenadur dezhañ e-unan e klasko ar *c'hile* tennañ e vad, gant harp e ambrouger, eus teulioù ar *Genunaniezh* hag eus kement tra a c'hello e skoazellañ a-fet buhez kristen hag enstuzegezh.

Ouzhpenn ar pezh a vez kinniget da holl berzhidi ar *Genunaniezh* e vo tu da aozañ evit ar *gileed* o-unan prantadoù a stummidigezh, retredoù speredel hag emvodoù breurel all.

Goude e vloavezh *engouestl* e c'hello ar *c'hile*, ma fell dezhañ mont pelloc'h, sevel un *emgleviad* nevez hag ober un *engouestl* evit ur bloavezh all.

Goude pevar bloavezh *engouestl* e c'hello ober un *engouestl da vat* evel *kile* e stern *Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna*. Koulskoude e c'hello bepred chom a-sav gant e *engouestl* pa fello dezhañ.

Bep bloaz, da-geñver un emvod eus ar *Genunaniezh*, ma'z eus tu, e raio en-dro e *engouestl* war un dro gant ar re o devo graet eveltañ o *engouestl meur*.

Ar *gileed* o devo graet o *engouestl meur* ne vo ket ret dezho sevel un *emgleviad* a vloaz da vloaz hogen gant skoazell o ambrouger e klaskint buheziñ gwelloc'h-gwell o galvadenn e stern ar *Genunaniezh*.

E dibenn emvodoù ar *Genunaniezh* e lavaro ar *gileed* o fedenn enkoulmañ war un dro gant holl izili ar *Genunaniezh*.

Lod *kileed* a vo dilennet evit kemer atebegezhioù e *Kuzul Tiegezh Santez Anna*.

Lod *kileed* engouestlet da vat a c'hello ober un emouestladenn gant leoù prevez evel rakwelet gant Gwir an Iliz.

### ÖARVENNADOÙ KEVREDIN BUHEZ AR *gileed*

El *Levr Emglev* hag en teulioù all boutin da holl berzhidi ar *genunaniezh* e kavo ar *c'hile* framm e *engouestl*.

Ouzhpenn emvodoù ar *Genunaniezh* ha disentezioù e *emgleviad hiniennel* e vez kinniget d'ar *c'hile* un nebeud engouestloù:

- Kejañ ingal gant e ambrouger - da nebeutañ ur wech bep tri miz - ha lodennañ gantañ a-zivout endalc'hioù pennañ e vuhez en doare da glask o buheziñ e sklêrijenn Doue hag en ur glask dizehan seveniñ e vennantez

- Sevel ul lizher bep tri miz d'e ambrouger gant un nebeut keleier a chello bezañ lodennet gant ar *Genunaniezh*.

- Daremprediñ ar *vreuriezh-annezel* ma vo stag outi ha zoken, ma'z eus tu, dont da dremen prantadoù buhez kumuniezhel enni.

- Kemer perzh en emvodoù reoliek aozet e stern ar *Genunaniezh*.

Mar ne glotfe ket, gant abeg mat, tra pe dra gant buhez ur *c'hile* ez eus tu da azasaat an traoù gant ma vo doujet ouzh gras engouestlidigezh ar *c'hile*.

## Krefen boutin evit sevel e *emgleviad*

Kinniget e vez d'an danvez *kile* sevel e *emgleviad* diouzh un nebeud krefen amañ da heul, dezhañ da ziskleriañ penaos e klasko buheziñ ar c'hrafmañ-kraf e-doug e vloavezh engouestlañ. Bez e c'hello ivez ouzhpennañ traoù all diouzh e vuhez hag e c'halvidigezh dezhañ e-unan.

Gant e *emgleviad hiniennel* - na vo roet da anavezout an diferadurioù anezhañ nemet d'e ambrouger ha da benntieg ar *vreuriezh-annezel* ma vo stag outi - e vo harpet ar *c'hile* en e hentadur evit pleustriñ en e vuhez pemdeziek galvadenn ar *Genunaniezh*.

### **Ar vuhez pediñ**

Dre ar bedenn eo e pleustro da gentañ ar *c'hile* galvadenn gevredin ar *Genunaniezh* da vont tre e lid an Emglev.

Er bedenn eo e kavo an nerzh d'ober eus e vuhez ur c'hinnig speredel oc'h en em wriziennañ en e sevenadur evit dispakañ e vuhez kristen gant holl binvidigezhioù e natur den.

En e *emgleviad* e tisklerio ar *c'hile* war betra e fell dezhañ pouezañ e-doug e vloavezh *engouestladenn* en doare da zizoleiñ gwelloc'h ar bedenn evel ma vez buhez er *breuriezhoù-annezel* (ar veuleudi, an azeulerezh, an orezon diazezet war Gomz Doue, pedenn ar Rozera...) ha da nevesaat e vuhez ouzh eienenn ar sakramantoù hervez diferadurioù reol an Iliz.

Gant skoazell e ambrouger e klasko enta degemer deiz-ha-deiz gras ar *Genunaniezh* en doare da reiñ klod d'an Aotrou en e vro.

### **Buhez nevez, enstuzegezh ar feiz hag abostolerezh**

Evel holl berzhidi ar *Genunaniezh* ez eo galvet ar *gileed* da vuheziñ enstuzegezh ar feiz en o fobl ha dre-se da desteniañ, hervez o stad buhez, eus Kelou Mat ar Silvidigezh er C'hrist. Evit gwir ez eo dre un eskemm burzhudus en deus ar C'hrist gwisket hor sempladureh evit hon gwiskañ gant e splannder ha treuzneuziañ hor buhez pemdeziek gant e c'hloar. Ar sevenadur kristen zo

dezhañ erzerc'hañ Emglev Doue gant an den hag herouezañ al lid anezhañ e buhez an dud.

Bezañ *kile* ne dalv ket da gentañ sammañ obererezhioù ouzhpenn met sevel ur gwir steuñv a vuhez evit buheziñ muioc'h-mui gras Emglev Doue gant e bobl dezhañ e-unan peursevenet e Jezuz ha lidet en e sevenadur.

Da bep *kile* enta da ziverzout, gant skoazell e ambrouger ha harpet war al *Levr Emglev* ha war *Levr burzhudoù Doue* en e vro, petra a c'hello pleustriñ a-zevri e-doug e vloavezh, peseurt obererezhioù a chello sammañ evit mont war-raok gant seurt hentadur.

### **Paourentez, diweirded, sentidigezh**

Galvet eo ar *c'hile*, hag eñ e darempred gant ur *vreuriezh-annazel* da zizoleiñ en e vuhez nerzh karantez Doue a laka da sevel ennomp an drugaregezh hag ar veuleudi hag hon doug d'en em ginnig d'an Tad war un dro gant ar C'hrist o tegemer ar vuhez nevez er Spered Santel.

Kinniget e vo d'ar *c'hile*, hervez e hentadur hag e stad buhez, dizoleiñ ar baourentez, an diweirded hag ar sentidigezh evel donezonoù a briz evit bevañ neshent ouzh Doue.

Galvet eo enta ar *c'hile* da vevañ gant eeunded, hep foraniñ; da zibab un doare bennak da yuniñ (war ar boued met ivez ar skinwel, ar butun...); da vezañ evezhiek ouzh ezhommoù ar beorion.

A-zivout an diweirded e klasko ar *c'hile* buheziñ erverkadurioù an Iliz hervez e stad buhez evel un elfenn eus diougonerezh Doue en e geñver.

O vezañ feal d'e *emgleviad* hiniennel ha da zarvennadoù boutin *kileed* ar *Genunaniezh* ez eo galvet ar *c'hile* da vont tre en ur sentidigezh karantezus diazezet war arglask an hesented ouzh ar Spered Santel.

### **Stummidigezh denel ha kristen**

Ar *c'hile* a glasko tennañ e vad eus e *engouestladenn* evit en em stummañ war an dachenn denel ha kristen gant skoazell ar *Genunaniezh* war-bouez deznadiñ gant e ambrouger petra a c'hell bezañ pleustret a zevri-kaer gantañ evit ma teufe da vezañ muioc'h-mui maen bev en Iliz ar C'hrist.

Klasket e vo kinnig d'ar *c'hile* mont tre e steuñv a garantez an Aotrou Doue war an den, par ha parez, diskuliet gant ar Skritur Santel ha dizoleiñ pinvidigezhioù Korf ar C'hrist, ar stadoù buhez disheñvel, ar gouniñverezhioù liesseurt en Iliz...

Kouviet e vo bepred d'en em wriziennañ e teñzorioù enstuzegezh ar feiz en e bobl ha d'en em zispakañ gwelloc'h-gwell en e sevenadur en doare da ganañ klod Doue gant holl binvidigezhioù e voud den.

### **Gwazerezh kumuniezhel**

Ouzhpenn engouestladennoù e vuhez e tibabo ar *c'hile* gant skoazell e ambrouger un doare bennak da gemer perzh er gwazerezh kumuniezhel e stern ar *Genunaniezh* evit pleustriñ e c'halvadenn da servijañ Doue war un dro gant e vreudeur.

Bez e c'hello dont da labourat un tammig evit ar *vreuriezh-annezel* ma vezo stag outi, kemer perzh en aozidigezh emvodoù ar *Genunaniezh*... Pep hini a gavo e zoare da wazañ, zoken traoù uvel kenañ, o c'houzout ma vo un eienenn a c'hras evitañ hag evit e vreudeur.

Damantus e vo ar *c'hile*, diouzh e araezioù bevañ, da harpañ oberennoù ar *Genunaniezh* ha pergen hini e *vreuriezh-annezel*.

### **Lid an engouestladenn**

Lid *engouestlañ Kileed Tiegezh Santez Anna* a vo graet peurliesañ da geñver emvod kentañ ar *Genunaniezh* (da-geñver an distro e miz Gwengolo pe miz Here) pe da-geñver un emvod all eus ar *Genunaniezh* pe c'hoazh e stern ar *vreuriezh-annezel* ma vo ar *c'hile* stag outi.

Pep *kile* en devo savet teir skouerenn neuze eus e *emgleviad*: unan da chom gantañ, unan all da vezañ roet d'e ambrouger hag an trede a vo lakaet e-pad al lid dirak skeudenn santez Anna a chomo gant ar penntieg.

E-doug un oferenn pe ul lidvezh e vo galvet pep *kile* (pe ar c'houblad) gant *Kerreizher Tiegezh Santez Anna* pe gant *penntieg* ar *vreuriezh-annezel*. Gant un nebeud komzoù e vo kinniget ar *c'hile*.

Ur wech bet kinniget ar *c'hile* pe ar *gileed* ma'z eus meur a hini oc'h *engouestlañ* d'an deiz-se, e taoulinint hag e tistagint o fedenn engouestlañ:

**"Hon Tad eus an neñv, kaset hoc'h eus ho Mab er bed evit hor salviñ dre E Groaz Santel hag hon dieubiñ diouzh sklavelezh ar pec'hed.**

**Salver Jezuz, dasprenet hoc'h eus gant ho kwad tud eus pep pobl, eus pep yezh, evit ober anezho Pobl Doue.**

*Spered Santel emaac'h o lakaat da sevel e kalon pep pobl ar c'han nevez dre Jezuz Krist evit klod an Tad.*

*Bennozh deoc'h Aotrou Doue evit ar silvidigezh kinniget dimp, bennozh deoc'h evit ho trugarez!*

*Leun a drugaregezh evit hoc'h holl vadoberoù, me va anv... a fell din hiziv engouestlañ evel kile e Kenunaniezh Tiegezh Santez Anna hag hi e-barzh tiegezh meur Jezuz a zo an Iliz.*

*Dindan gwarez santez Anna e vennan kerzhout war hent ar Pask, degemer drezi ar Werc'hez Vari evit bevañ neshent ouzh Jezuz dindan lusk ar Spered Santel.*

*Mennet on da zegemer bemdez-Doue c'hwezh ar Spered Santel ha da vont tre e lid meur an Emglev deraouet da geñver ar Pantekost o kanañ meuleudi an Aotrou dre va buhez a-bezh gwriziennet ha dispaket e sevenadur va fobl.*

*Bennozh deoc'h Aotrou Doue c'hwi hag a ra pep tra nevez gant c'hwezh ar Spered Santel !*


*En em fiziout a ran e santez Anna evit kreskiñ en anaoudegezh hag e karantez Jezuz Krist gwir Doue ha gwir den, ganet eus ar Werc'hez Vari hor Mamm hag hor Rouanez hag e c'houlennan pedenn va breudeur."*

